

S. A. D. E. D.

KANT UGENT  
TESTENN VERR  
A LENNEGEZH

**PREDER**

Kaier 130-131

Ebrel-Mae 1970

S. A. D. E. D.

**KANT UGENT  
TESTENN VERR  
A LENNEGEZH**

**PREDER**

**Kaier 130-131**

**Ebrel-Mae 1970**

Un istor he deus an dastumadenn-mañ. Ar graonell gentañ anezhi e voe ar skrivadennoù roet en eost 1963 gant bagad izili S.A.D.E.D. da skolidi Kamp Etrekeltiek ar Vrezhonegerion Langoned. A vloaz da vloaz abaoe, keit ma padas ar c'henlabour gant K.E.A.V., betek 1967 ha, goude se, pa aozas Skourr an Deskadurezh Vroadel devezhioù studi d'e dro, ez eus deuet strobadoù testennoù nevez da goeñvañ ar c'houstell betek ober danvez ul levr. Ken ma voe divizet e 1970 sevel ur c'haier eus Preder gant ar pennadoù-se, o lemel diwarno evelkent an titl "skrivadennoù" peogwir e talvezont kenkoulz-all d'ober, ouzhpenn skrivadennoù, pleustradennoù diseurt war ar yezh, al lennegezh, ar gealiadurezh.

Diouzh o diaester eo bet renket an testennoù, ar re aesañ er penn-kentañ. Ur brasrenkadur n'eo ken, rak dizunvan eo an hentoù kemeret gant an danvez emsaverion evit dont d'ar yezh hag, e-se, amjestr eo savelañ ur reizhiad verkoù unvan da briziañ diaester ur skrid.

Evel ma reer pa brienter testennoù evit ar skolioù, ez eus bet degaset un nebeut kempennadurioù d'ar skridoù orin. Da gentañ int bet lakaet holl er reizhskrivadur a vremañ. Koazhet eo bet d'ar muiañ an henstummoù hag ar rannyezhegadurioù. Ouzhpenn-se, pennadoù 'zo zo bet krennet, lamet diouto arroudoù o hirae pe o fonnerae hep gounid evit an displeg dibabet.

Ret eo anzav ned a ket an dastumadenn-mañ e-biou d'ar si a gaver gant al levrioù eus he seurt : tidek e chom an dibaboù o deus renet war hec'h aozidigezh. Pep lenner, hag an aozerion o-unan abaoe m'o deus klozet ar roll, a ziskoacho dek ha dek arroud all a vije bet 'dispar lakaat er C'hant ugent testenn verr... Echuadur avat a rank bout da bep labour.

Trugarek e vo arveriadet an dastumadenn-mañ ouzh ar geneiled o deus lakaet o labour, o anaoudegezhioù hag o blizidigezh d'he c'hempenn ha d'he c'hlokaat, Ph. LANNUZEL, Gw. AR MENTEG hag A.E. AR BERR.

ROLL AN TESTENNOU

	<u>Titl an destenn</u>	<u>Oberour</u>	<u>Pajenn</u>
1	Kan ar portezour ,	Jakez RIOU	11
2	Ti Dangan	ABHERRI	11
3	Brest	Roparz HEMON	12
4	Serr-noz en ti dianav	Roparz HEMON	12
5	Un devezh vak e New-York	Youenn GWERNIG	13
6	O tont da emsaver	Youenn OLIER	14
7	Ar bleizbroc'h	ABEOZEN	14
8	Goude an emgann gant Satanaz	Jakez RIOU	15
9	Dreistweled ar Gelted	Y.-V. KERWERC'HEZ	16
10	Anv ne ra ket gwad	CALDERON (br. Youenn DREZEN)	16
11	An amprevaned askellek	FOC'HALAN	17
12	Abegoù c'hwitadenn Kendalc'h	EMSAV	17
13	Kastell Keroulaz	Roparz HEMON	18
14	Al laeron	Jakez KONAN	19
15	Ar c'hazh	Roparz HEMON	19
16	Israel	Per DENEZ	20
17	Blaz ar gwad	D.K. KONGAR	21
18	War an talbenn	ABEOZEN	21
19	Ster hon istor	EMSAV	22
20	Derou an emgann dispac'hel	EMSAV	23
21	Petra zo da ober?	Roparz HEMON	23
22	Logota	ABEOZEN	24
23	Ar c'horf marv	Y.-V. KERWERC'HEZ	24
24	Kent dizouarañ	Yann MARION	25

25	Mamm an emsaver	Per DENEZ	26			
26	Meven Mordiern	Arzel EVEN	27	53	Goude diskaridigezh ar monumant	Jakez RIOU 47
27	Taolenn a familh	P. KERMOAL	27	54	Tstor ha youl an den	EMSAV 48
28	Ar pek	Ronan HUON	28	55	Emdroadur ar brezhoneg	G. DUBOURG 49
29	Ar varc'heion	Y.-V. HENEU	29	56	Levezon ar sevenadurioù war ur vro	Roparz HEMON 49
30	Abegoù c'hwitadenn ar CELIB hag ar MOB	EMSAV	29	57	Emgann ha trec'h Peredur	J. Le ROUX 50
31	Prederioù Abrobin	Yeun ar GOW	30	58	C'hwitadenn al lennegezh-pobl e derou an 20 <sup>th</sup> kd.	Roparz HEMON 51
32	Orin an isdioreadur	Per PENNEK	31	59	Jezuz dirak Pilat	Maodez GLANNDOUR 52
33	Studi ar yezhoniezh	Roparz HEMON	32	60	Emvod er maerdi	Yann MIKABEL 53
34	Hunvre ar rouanez	Youenn DREZEN	32	61	An douaridigezh	Roparz HEMON 54
35	Ur galon dir	Lan INISAN	34	62	Er Merzher-Salaun	Nannig ar MEE-CHEREL 55
36	Mojenn al Lec'h-Meur	Roparz HEMON	34	63	Muntr en ostaleri	Y.-V. KERWERC'HEZ 55
37	Krogad e predva ar skol-idi	Y.-V. KERWERC'HEZ	35	64	Paradoz an natur c'hlas	ABANNA 56
38	Koulmir	Mari ARSANT (br. abENNEZ)	36	65	Yun o prederiañ	Y.-V. KERWERC'HEZ 57
39	Piv eo an emsaverion?	EMSAV	36	66	Roll ar c'hweluniadoù gall e Breizh	EMSAV 58
40	Roll istorel al lennegezh	Danevelloù SADED	37	67	Daou zarvoud	Gi ETIENNE 58
41	Deirdre ha Noise	Roparz HEMON	38	68	Emsav ha sokialouriezh	EMSAV 59
42	A-zivout Gwalarn	EMSAV	39	69	Lezardrev	KBRVERZHIOU 60
43	Dre ar maezioù hag al li-orzhoù	Ivon KROG	39	70	Sevenadur e Breizh	EMSAV 60
44	Ur baradoz-an-douar	TALDIR	40	71	Penaos saveteiñ ar brezhoneg kuit a bolitikerezh	EELISAMA 61
45	Ar c'hreunenn ed	R. TAGORE (br. Maodez GLANNDOUR)	41	72	Al liamm emsavel	Danevelloù SADED 62
46	E Pirieg	Youenn OLIER	41	73	Labour kefridiadel ha labour politikel	Raklun ob. ESB 63
47	Bezañ brezhon gwechall ha hiziv	EMSAV	42	74	Marv Izold	LANGLEIZ 64
48	Peoc'h an noz	ABEOZEN	43	75	Goude ar film	Roparz HEMON 64
49	Goude an iperit	ABEOZEN	44	76	O c'hoari Salaun ar Foll	Jarl PRIEL 65
50	War an hent	Ronan HUON	45	77	Ar sant bev	Y.-V. HENEU 66
51	Va mamm-gozh	Jarl PRIEL	46	78	Klasker kened	Jakez RIOU 67
52	Foltred ar gened	Jakez RIOU	46	79	Prezegenn sant Anton d'ar pesked	68

80	Orin diempradur ar gevred- igezh vrezhon	EMSAV	69	108	Latar	Joelle KERMOAL	93
81	Ar Graal santel	Y.-V. HENEU	70	109	An dangorelezh	EMSAV	94
82	Dremm dispac'hel ar brezh- oneg	EMSAV	70	110	Muntr	Goulven PENNAOD	95
83	Eleimor	Roparz HEMON	71	111	Ur poltred fromus	STORM (br. Per DENEZ)	96
84	Kollet e mor ar brezhoneg	Y.-V. KERWERC'HEZ	72	112	Darvoud war an draezhenn	Yeuenn DREZEN	96
85	Bizied ar winienn	Loeiz HERRIEU	73	113	Gouennata	Yann MIKABEL	97
86	E ti ur vourc'hizez uhel	Roparz HEMON	74	114	Solikaat	EMSAV	98
87	Ur skouer a egor istorek	EMSAV	74	115	Bombarder ha bleiz en hev- elep toull	Yeun ar GOW	99
88	Ar wezenn dilh	Fañch al LAE	75	116	Gleskered	EMSAV	100
89	An emsav hag ar bed	EMSAV	76	117	Mar goufec'h e teufec'h 'vit atav	D.K. KONGAR	101
90	Ar gaouad	BLEIMOR	77	118	Ar riskladur istorek	EMSAV	101
91	Bleuñv	Maodez GLANNDOUR	78	119	Ur brosesion dregeriat dibarek	Jarl PRIEL	102
92	An emsavdegoù kouerion en hon bro	Yeuenn OLIER	78	120	Loc'hadenn-veure er Sahara	Yann MIKABEL	103
93	Un taol-spont	ABEOZEN	79				
94	An argadenn-noz	R.M. RILKE (br. Olier MORDREL)	80				
95	Keuz war-lerc'h...	Jakez RIOU	81				
96	Kudennoù politikel ar ri- ezoù sokialour	EMSAV	82				
97	Sadorn Fask	R. Peniarh	83				
98	Ar c'hevala istorek	EMSAV	84				
99	Kengarantez Manos ha Bena	Sketla Segobrani	85				
100	Torrerion ec'hwel kastizet	Yeuenn DREZEN	85				
101	An ael du	Tangi MALMANCHE	86				
102	Ar varmouzion	ABEOZEN	88				
103	Pe ober evel ma ra "Gwenn- ha-Du"	Yeuenn DREZEN	88				
104	Alioù Ali	Roparz HEMON	90				
105	Er c'hoad	Yeun ar GOW	90				
106	Goañv	Reun MENEZ-KELDREG	91				
107	Pezh n'eo ket din an holl	HÖLDERLIN (br. Alan E.AR BERR)	92				

## KAN AR PORTEZOUR

Un heol gwenn a bare etre targosioù diskourret ar c'hleuz. Ur voualc'h a biklamme dirazomp penn-da-benn gwrinnenn ar waremm. An amzer a oa skornet ha difiñv war an uhel.

- Selaou! eme Alan.

Edo ur c'harr o pignat du-hont gant an hent. Draskadennoù ar rodoù o storlokat er skoaselloù a zassone en aer yen, evel pa vije bet an hent tost-tre, en tu all d'ar c'hleuz. Ar paotr-karr a gene.

-Ar portezour! eme Alan. Bloaz 'zo ne'm boa ket klevet e ganaouenn.

Alan a dride e galon o kavout hep kemm e vro c'henidik. Dre ma kerzhemp e tisplege din :

- Bep lun, en ur vont da gas bleud da gêrioù ar menez, e kan ar portezour, abaoe bloavezhioù, ar ganaouenn a glevet. N'eus ket par, war e veno, d'an diskan-se da lakeat ar jav da vont ingal gant an hent.

Jakez RIOU, Geotenn ar Werc'hez 1934.

2.

## TI DAMGAN

Ne spurmanten, pa oan krouadur, nemet buhez laouen ti Damgan, monedone kement a dud a zeue da welout va zad-kozh, da zivizout ha da breidiñ gantañ, e sigur kempenn pep tra evit mouezhierezh ar c'hannad nevez.

Na bourrus bout degemeret en ti-se! Ur vestrez karadek e oa va mamm-gozh, gwiv ha prim gant he c'horf moan, daoulagad brizh ken bouilh dezhi, he genou bihan o vouse'hoarzhin atav. Brezhier mourb a zouge d'al liesañ, tokoù ledan gant bokedoù

warnezh, bepred nifl ha koant. He vertuz pennañ a veze ar vadelezh, ul largentez a glote gant hini he fried, hep bout entanet eveltañ. Desavet mat ha lusket gant ur garantez disi, e ouie bout bourrus e-keñver an holl, ar re baourañ evel ar re uhelañ. Nag a draou a'm eus desket diganti!

ABHERRI, Evit ket ha netra 1951.

## BREST

Edo Donald Kerlaban azezet en he c'hamb, e-kichen ar prenestr serrret, harpet he daoulagad ouzh ar skindommez, ul levr digor war he barlenn. Eno e kare chom en endervezh. Ac'hano en em astenne ar sell war al liorz, ha pelloc'h, war un darn vras eus kêr, ha war lenn Vrest en he fezh. Gwelout a rae dirazi al listri diniver, war ar chadenn, pe o vont, ha kirri-nij o c'hoari dre ar c'houlmoul, pe o risklañ a-rez an dour. Ne ouie ket mat perak, bep gwech ma selle ouzh ar porzh bras-se, unan eus porzhioù brasañ ar bed, lorc'h a save enni. War an tu dehou dezhi e wele iliz nevez-flamm Sant Erwan, he femp tour gwenn ha glas sklerijennet gant gouloù ruz ar c'hornog, a-zioc'h toennoù stank karter poblek Sant Mark. Hag er reter, war an tu kleiz, e wele kenkizioù pinvidik ar Vilin Wenn, gant o liorzhoù, o gwerjeoù, o zachennoù-c'hoari ec'hon,- bremañ distro, rak glav a oa bet,- hanter sanket en deñvalijenn.

Roparz HEMON, An Aotrou Bimbochet e Breizh  
1927.

## SERR-NOZ EN TI DIANAV.

An tri faotr, hep krediñ a-boan fiñval na zoken kaozeal

en un Ti dianav, a vanas an holl abardaez el lec'h ma edont, an noz oc'h aloubiñ tamm-ha-tamm ar bed en-dro dezho. An evned, kavet ganto o c'hilud, a davas. Ur wech c'hoazh e teuas al Loar da strewiñ, amañ pezhioù acour hag ahont pezhioù arc'hant. C'hwez ar roz a yeas ponner, o tont a-vouilhad war an sezhen glouar, pep bouilhad frondusoc'h eget an hini a-raok. Ar pre-ester a oa chomet digor-bras. A-vec'h ma spurmantet an oabl stergannek a-dreuz deliaoueg stank al liorz, ar brankoù, ar skourroùigoù treset du evel neudennoù ur roued. An dud, moarvat, a oa kousket holl. Al loened a seblante bezañ kousket holl ivez. Kaer a oa selaou, a neblec'h ne darzhe an disterañ trouer.

Roparz HEMON, An tri Boulomig Kalon Acour  
1961.

## UN DEVEZH VAK E NEW-YORK

Edo hon treñ o vont da dreuziñ lenn-vor Jamaica. War hon tu kleiz e welemp savadurioù Porzh-nij Etrevroadel Kennedy gant renkadoù a girri-nij meur o c'hortoz o zro da vont d'an nec'h. Edo unan dres o paouez dizouarañ, dont a rae buan-buan davedomp. Fresk e vefemp mar deufe ar pezh tra ramzel-mañ d'en em frigasañ war an treñ. An teir flac'h a selle ivez, esmaet, endra strake a-us d'hon penn kurun ar pevar rotor.

Diouzh an daou du bremañ en em lede dour lor ar vorlenn. Gwelet e veze bagadoù houidi o neuial goustadik, ken disebl-ant ha tra ouzh tarzhadeg ar bigi tredan bleniet gant kêriz o genou leizh a c'hoarzh oc'h ankouaat labourioù tenn ar sizhun en ur c'hoari moraer war ur mor dizañjer. Deuet e oa an evned d'en em voazañ ouzh an trouz moarvat dre ma ne veze ket dibluet o reor dezho gant plom berv da heul an tarzhioù!

Youenn GWERNIG, Tonkad 64.

## O TONT DA EMSAVER

Komzet 'm eus diwar-benn ar paotr a ziazeze e vroadelouriezh war an Istor. Gouez dezhañ, Breizh a zlee bezañ dieub en amzer-da-zont peogwir e oa bet dieub gwechall; gant gerioù all, Breizh he doa gwirioù istorel. Buan a-walc'h avat e veizis pegen kleuz e oa seurt poellatadur: n'eus ket a wirioù istorel gwirion er-maez eus an Istor bev. Piv a gredfe asuriñ he deus Burgondia, lakaomp, pe broioù all net da get, gwirioù hiziv an deiz war neuz ez int bet Stadoù dishual gwechall? Ar re varv, ar re n'eus ket mui anezho n'o deus mui gwirebet. Diazez gwirioù Breizh zo en Emsav, ne vern a belec'h e tenn hemañ e orin. En Emsav hepken e kendalc'h Istor Breizh, mard eo an Istor youl emskiantek ur stroll da vestroniañ e donkadur.

Youenn OLIER, O sellout war va c'hiz  
1968.

## AR BLEIZBROC'H

Un abardaevezh e tremenas ar bleizbroc'h tost d'ur gêriadenn. Edod e ti penn-bras ar gêriadenn o paouez lazhañ un ejen a-benn eured mab an ti. Hag ar bleizbroc'h a dostaas da c'houlenn digant ar gigerion ul lodenn eus ar bouzelloù, a wele en ur bailh e toull an nor.

- Naon a'c'h eus, reder-noz? eme unan anezho. Ret eo dit avat gounit da voued! Niver enta betek ugent, hep lavarout unan?

Ar bleizbroc'h a soñjas ur pennad:

- Neuze, emezañ, va c'hoant a'm bo, mar niveran betek ugent hep lavarout unan?

- Ya, m'henn tou, eme ar c'higer.

- Peder gavr ha div yar, daoust ha ne reont ket ugent troad?

eme ar bleizbroc'h.

- Gounezet 'c'h eus, emezañ, hag e stlapas dezhañ ur vouzellenn.

Ar bleizbroc'h a sammas an tamm hag en hent.

An neb en deus ijin a zeu atav a-benn eus e daol.

ABEOZEN, Levr al Loened  
1934.

## GOUDE AN EMGANN GANT SATANAÑ

Ar marichal a savas e benn. E fri a oa o wadañ. Ne gomprens ket re vat en holl ar pezh a oa c'hoarvezet. C'hoant en doa da lavarout: Petra an diaoul on deuet da ober amañ.

! Ya, petra an diaoul e oa deuet ar marichal da ober di? Keuz, keuz bras en doa, met re ziwizhat e oa.

Ar marichal a sentas. Job a gendalc'has:

- Marichal, klevit! Mar lavarit ur ger, klevout a rit? Ur ger zoken da baotrad Landremel, a zo o c'hortoz ac'hanoc'h en traoñ, war an hent bras, neuze, me henn lavar deoc'h, krenn ha kras, dirak ho taoulegad, neuze hoc'h eus houarnet ho marc'h diwezhañ.

- Hañ?

- Ya! ya! marichal; houarnet ho pefe ho marc'h diwezhañ, rak me a grougfe ac'hanoc'h dirdan eizh devezh, en ho liorz, gant al lerenn hoc'h eus degaset ganeoc'h da grougañ ac'hanon. Em-ichañs hoc'h eus komprenet? Mat! Lom, diskargit ur volennad sistr d'ar marichal.

Kement a den a oa o virviñ e daoulagad Job, ma voe spontet ar paour kaezh marichal. Soñjal a reas adarre: Petra an diaoul on deuet da ober amañ?

- Yec'hed deoc'h ho-taou! emezañ.

Jakez RIOU, An ti Satanazet.

## DREISTWELED AR GELTED

9.

Rambreal, hunvreal, ha netra ken a yae brav gantañ. Kemeret en doa ar pleg a-vihanik da brederiañ an nebeutañ ar gwellañ, ha morse buan. Berniañ a rae an darvoudoù hag ar c'hudennoù en ur c'horn teñval en e benn, betek gouzout. Chom a raent evel-se dizimplij e-pad eurvezhioù pe bloavezhioù. Pa zeue avat koulz da ober ganto pe d'o dirouestlañ, n'en doa Yun nemet digeriñ un duellennig kuzh en e empenn hag evel ma tiver an dour, e rede e-maez an netra ur mennoz resisoc'h eget m'en defe labouret noz-ha-deiz d'o c'havout. "Dreistweled ar Gelted" a rae Yun eus e zisegi spered. Siwazh, hesk e chome tuellennig kuzh e empenn a-wechoù.

Setu perak evit en em genmerzhañ e sachas Yun kalonek war e gorn hag e c'hwezhaz ur goabrenn voged tev ken ma voe e dal evel ur menez uhel ha sioul a-us koumoul ar c'hompezennoù.

Yann-Vari KERWERC'HEZ, En ur rambreal  
1943.

10.

## ANV NE RA KET GWAD

Lavar din, war da tuhez, hag ez eus unan bennak, n'oufe ket ez eus ac'honan, daoust a ouenn yac'h, un den bilen, un troc'her buzhug? N'eus ket unan, anat. Petra enta a c'houezfen-me o prenañ titloù-noblañs digant ar roue, ma ne brenan ket ar gwad? Ha lavaret e vo ez on gwelloc'h eget bremañ?... 'Toue sur! Dibocell e vefe. Petra a vo lavaret neuze? ez on nobl, abalamour da bemp pe c'hwec'h mil real?... Argant eo an dra-se, ha n'eo ket enor eo: den ne bren an enor.

Mar karez, e roin dit ur skouer, daoust ma n'eo ket eus ar re uhelañ! Moal eo bet penn un den e-pad mil bloaz, hag a-benn neuze, e laka ur berukenn. Krediñ a ra dit n'eo ket mui moal

evit e amezeion? Nann, ha lavarout a ra ar re-mañ pa sellont outañ: Brav-brave toug Peanve berukenn! Da betra enta e talvez e berukenn, daoust ma ne weler ket e benn disto, ma car an holl eo moal an den? Da zistanañ e dammig mez, ha da derrañ divadelezh an heol, ar skorn hag an avel, na muioc'h!

D. PEDRO CALDERON DE LA BARCA, Aotrou Maer Zalamea.  
( tr. Youenn DREZEN 1942 )

11.

## AN AMPREVANED ARDREDEK

A-us d'ar red-dour koantik ha flour, e-kreiz ur prad melen-aour, an amprevaned askellek a nije-dinije en heol tomm-grizias: ar valafenn liesliv, an nadoz-aer hir ha mistr he c'horf dimezell, kelion a bep seurt ha c'hwibu niverus o c'horoll dibaouez. Eus ar foenn kras ha frondus e save kanaouenn nerzhuz hag unton ar skrilh o rimiañ hep ehan hec'h eskell kalet an sil ouzh eben. War an dour boull, e lamme an amprevaned hirdroadek a-daoladoù. Sioulder an oabl a rene war ar parkoù, ar gwez, ar foennseier, an dour, an tiez hag ivez war an dud faezhet gant ar wrez.

Ur valafenn gaer, ruz, glas, melen ha gwenn a oa war ur vleunienn nepell diouzh ar stêr; en he c'hichen un nadoz-aer, ken brav all, a soube, bep ar mare, beg he lost en dour fresk. A-rez gorre ar red, e c'hede un dluzhenn an amprevaned, darev da lammat ma tegouezhfe unan bennak.

ROCHALAN, Ar valafenn hag an nadoz-aer, Armor 1944.

12.

## ABEGOU C'HWITADENN KENDALC'H

C'hwitañ a ra Kendalc'h evit abegoù sklaer. Ur gevredigezh.

zoken ma n'he deus ket ur pal politikel war-eeun, ne c'hell ket tremen hep un diazez politikel, hep ereoù ouzh ar framm politikel. Ha ne dremen ket Kendalc'h hep daveiñ d'ar frammoù politikel; hogen, gwech e ra dave d'ar framm brezhon ha drezañ, gant rat pe get, d'ar Stad Vrezhon, gwech, ha peurliesañ, e ra dave d'ar framm gall, d'ar Stad C'hall, n'en deus nepred paouezet a-hend-all a sellout evel framm reizh ar vro-mañ. Keit ma chomo Kendalc'h hep ober un dibab fraezh ha krennus etre an daou framm, e c'hellomp diogeliñ dezhañ e vo ur c'hwitadenn kement tra a glasko ober, forzh pe uhelberzhioù o defe e renerion, forzh pe venezioù a zilec'hfent dre nerzh o divvrec'h.

Emsav 4/90 1967.

#### KASTELL KEROULAZ

Evel kalz eus kastelloù kozh Bro-Leon ez eo kuzhet en un draonienn vihan. An neb a dremen war an hent a c'hell krediñ n'eus eno nemet ur c'hoad. Ur gloued etre daou biler maen a verk an digor, hag a vefe kemeret gant ur estren evit kloued ur park pe ur prad. A-dreñv ar gloued ez eus ur c'harrhent a-boan ledanoc'h eget ur wenodenn. Kamm-digamm eo. Goude ur pennad e weler un ti-feurm a-zehou. Tamm-ha-tamm e teu ar gwez a-hed ar c'harrhent da vezañ uhel-uhel. Neuze e kaver ur stêrig a gouezh en ul lennig koant, mogerioù damziskaret ur vilin gozh etrezo. En tu all d'al lennig, en un taol, e weler ar c'hastell, hag e chomer souezhet dirak an tour bras o sevel e-kreiz an dour, an daou dour bihanoc'h, toenn ar chapel, he frenestr kizellet tost ken uhel ha ledan ha prenestr un iliz-veur. Ret eo ober tro al lennig evit dizoleiñ ar porzh gant e renkadoù prenestr en daou du da bazennoù maen an nor-greiz.

Roparz HEMON, Diamantoù Keroulaz 1964.

#### AL LAERON

Un devezh m'edo Ali Baba er c'hoad, echuet gantañ troc'hañ ha drailhañ danvez-tan a-walc'h da ober samm d'e ezen, e verzas en diabell ur boultrenn vras o sevel en aer hag o tostaat en tu dehou d'al lec'h m'edo. Sellout pizh a reas, hag eñ o welout neuze ur bagad niverus a dud war varc'h o tonet gant herr.

Goude ma ne veze ket komzet eus laeron er vro e teuas ovelato Ali Baba da soñjal e c'helle ar varc'hegerion-se bezañ laeron. Hep klask gouzout petra a c'hellfe degouezhout gant e ezen, e fellas dezhañ saveteiñ e vuhez da gantañ holl.

Hag eñ da bignal en ur wezenn dev, stank-tre ar skourroù anezhi. En em guzhat a reas en o zouez ken dinec'h ha tra, peogwir e c'helle gwelout ar pezh a dremene hep bezañ gwelst e-unan. Ha neuze, ar wezenn-se a greske ouzh troad ur roc'h-ell distok a bep tu, kalz uheloc'h eget ar brankoù uhelañ ha ken serzh ma ne c'halled krapat war he c'hern dre du ebet.

Bras ha nerzhus 'e oa ar varc'hegerion, pep a loen kaer ganto. Armët-mat e oant ivez. Ur wech degouezhet e-tal ar roc'hell e tiskennjont diwar o c'hezeg. Daou-ugent a oa anezho, hervez m'o niveras Ali Baba; ha diouzh gwelout o neuz hag o harnezioù, hep mar ebet, e oant laeron.

Jakez KONAN, Ali Baba hag an daou-ugent laer 1953.

#### AR C'HAZH

War se e reas ur mousc'hoarzh. Mousc'hoarzhin a rejomp ivez. Mousc'hoarzhin a reer bep tro ma komzer eus hon c'hag-iner.

Un den tost daou-ugent vloaz eo. Un anv bennak en deus evel ar re all. Ganimp-ni avat eo ar C'hazh, en abeg d'e

zaoulagad gwer, me 'gred. Evit gwir, n'eo ket e zaoulagad hep-ken, met e gorf a-bezh, e zoare kerzhout, e zaouarn hag e zaou-droad bihan evel re ur vaouez, a ro dezhañ neuz ur c'hazh. Dont a reas, seven-tre, en ur deurel selloù a-gleiz hag a-zehou, gwech ebet eeun dirazañ, evel o klask ul logodenn en un toull bennak e vije. Hervez kustum, kempenn-tre oa e zilhad, zoken e davanjer, pezh a zo dibaot, va mignonez, gant ar geginerion. E voned a zalc'he en e zorn, hag o vezañ m'en deus kollet an hanter eus e vlev, e lugerne e benn er bann heol a gouezhe a-dreuz d'ar gambr dre an nor damzigor.

Roparz HEMON, Mari Vorgan 1962.

## ISRAEL

An eil lusk a feiz a-berzh Sioniz zo bet degemer an hebr-eeg da yezh vroadel... Adarre e kemeras ar Yuzevion an hent di-aez, a oa an hent mat... Stourm a reas an dud fur a-enep, o lavarout e oa an hebreeg ur yezh tenn da zeskiñ, ur yezh na oa ket tu la zisplegañ enni kudennoù ar bed, ur yezh a oa pep tra enni da sevel - pezh a oa gwir penn-da-benn. Stourm a reas ar rabined, ar re nemeto o doa c'hoazh un anaoudegezh bennak eus an hebreeg, o lavarout e vefe ur pec'hed lakaat yezh santel ar Bibl da servijout da ezhommoù disantel ar vuhez pemdeziek. E-unan-penn e oa Ben Yehuda o stourm a-enep youl fall un darn vat eus e genvroiz, hag a-enep leziregezh an holl. Gantañ ne oa nemet e feiz. Dont a reas avat da Balestina en ur douiñ ne zistagfe morse ger ebet nemet en hebreeg e ve, hag en ur zif-enn na vefe komzet yezh all ebet ouzh e vugel. Stlapet e voe mein outañ e straedoù Jeruzalem. Met adarre, ar feiz a drec'h-as war ar gasoni, ha, pezh a zo diaesoc'h, war furnez laosk an dud dereat.

Pêr DENEZ, Israel 1954.

## BLAZ AR GWAD

Chomet e oamp hon daou a-sav evel pa vije bet un dra div-izet en a-rack hag e sammis anezhi war va bruched hag he stard-añ evel pa vije bet ivez un dra all divizet pell a oa. Hon div-anal a gemmeskas adarre hag a-dreuz va dilhad e santen he bruched o waskañ din va bruched.

Hag e pokis d'he muzelloù teir gwech. Ha mezet gant ar garantez skiltr a verve en hini kentañ, me da glask tañva c'hoazh donoc'h ar muzelloù-se astennet da reiñ. Neuze e savas warno ur blaz all, ur blaz badinellus da gemmeskañ gant an hini kentañ hag en trede hini ne chome nemet hennezh, blaz ar gwad, heñvel ouzh ul latarenn dev hag eonennek a lakaas da greskiñ ennon eñvor ur ganenn a'm boa klevet un deiz ma oa gwenn pep tra da serr-noz.

D.K. KONGAR, Gant blaz an avaloù rus 1937.

## WAR AN TALBENN

Pemzek deiz 'zo, dre un abardaevzh glav-pil, e tegouezhas Erwan, a-gevret gant ur c'hant a soudarded eus ar c'hlas c'hwezek, e Kanienn ar Bineg.

Pemzek deiz 'zo en ur c'hev gleborek, ma tivere ennañ an dour etre ar c'hefiou-sapr, e reas e gentañ kousk talbenn, e ballenn sachet war e benn da virout ouzh ar razhed a zont da biltrotat en-dro d'e fri.

Gwelet en deus dizale neuz kailharet ar brezel, en douar-où fraost ha dispennet, ma talvez enno ar soudarded da loened-samm. Biskoazh betek neuze n'en doa ranket terriñ e gorf e seurt labourioù tenn. Hag evel ar re all e sammas, gwellañ ma c'halle, rolladoù neud orjal, postoù koad, postoù houarn hag

all. Ne ouie dare avat pegeit e padfe, ouzh seurt skuizhder, e izili, eskuit a dra sur, evel re ur paotr yaouank yac'h, hogen ka, e doare ebet, evit an nerzh hag an ampartiz, da izili kigennek ur simiad.

Setu perak antronoz, pa voe galvet da vurev ar gompagnun- ezh ha goulennet da eil reder en deus asantet a galon vat. "Kement-mañ", a soñjas-eñ, "zo diouzh va nerzh da vihanañ." Ha bremañ, p'eo savet er fozioù-difenn, e stag da zeskiñ e vicher nevez.

ABBOZEN, Dremm an Ankou 1942.

STER HON ISTAR

Moarvat ne ra ket diouer dimp al levrioù diwar-benn Istar hon bro. Hogen ne gav ket dimp e c'hellomp bezañ lacuen ganto. Da gentañ int bet savet gant gallegerion stummet gant ar seven- adur gall ha n'eo ket souezh enta mard eo diaes tennañ diouto ur gentel bennak e sell da stummañ amzer-da-zont ar vro. Ha pezh a zo kiriek d'an dra-se eo dres an diouer a skiant-varn a ra anezho meulganou berrboell a-walc'h. Kredet e ve o lenn an ob- erennoù-se o deus graet ar Vrezhoned bepred o seizh gwellañ evit difenn ar vro hag ez eo aet houmañ da fall en abeg da zrougiezh hon enebourion pe an Dichañs nemetken. War veno ar skrivagnerion-se ez eo bet diskaret Breizh bepred eus an diav- aez; prest int dalc'hmat d'ober tud-veur eus kement hini en deus kemeret perzh en Istar o bro o tifenn - pe oc'h ober van da zifenn - "frankizioù" pe "gwirioù" ar vro, goude ma n'o defe graet nemet siellañ faezhidigezh washañ hon Istar, evel Anna Vreizh.

EMSAV 5/101 1967.

DEROU AN EMGANN DISPAC'HEL

E gwir, brezel zo e Breizh abaoe deiz kentañ an Emsav. E mareoù 'zo e vez kriz ha gwadus, e mareoù all e vez mut, evel un tan dindan al ludu. Hogen ne baouez ket. Ne c'hallo paouez nemet gant dibenn ar galloud gall e Breizh.

Ar brezel renet gant ur bobl-suj ouzh ar galloud sujer, ar brezel dispac'hel, a c'houlema digant an Emsav-dieubiñ perzh- ioù n'int ket re ul lu reoliek savet gant ur riez enep d'ur riez all. Al lu reoliek zo un nerzh fizikel diforc'h, ma n'eo ket distag, diouzh nerzh speredel ar vro. Al lu dispac'hel zo da gentañ un nerzh speredel; drezañ e tfluk spered ar vro di- ouzh noz ar sujidigezh. Dre-se, an emgannoù kentañ en deus da ren zo emgannoù speredel: an nerzh fizikel a zeu dezhañ da heul e drec'hioù war dachenn ar spered.

An emgann dispac'hel a vez renet da gentañ e-pad pell amz- er war dachenn ar spered. Anez kompren ar wirionez-se, ne gom- prener netra er pezh a dremen e Breizh abaoe derou ar c'hantved- mañ.

EMSAV 5/113 1967.

PETRA ZO DA OBER ?

Ha setu bremañ ar fazi bras a reer: krediñ ez eo a-walc'h treiñ kein ouzh Bro-C'hall, a-walc'h lavarout "Me zo Breizhad", da vezañ digabestr. Aes e vefe diskouez pegen kreñv eo chomet dalc'h an estren betek war ar re ac'hanomp o deus stourmet da enaouiñ ar spered breizhat. Sellit ouzh hon lennegezh, ha kem- ent he deus amprestet digant lennegezh Bro-C'hall, ouzh stumm hon barzhoniezh, heñvelekaet diouzh hini Bro-C'hall, ouzh hon pezhioù-c'hoari, savet diouzh skouer re Bro-C'hall. E pep lec'h hag e pep giz, betek en hon doare-skrivañ, e kaver merk

Bro-C'hall.

Ar wirionez eo hon eus e Breizh,- evit bremañ da vihanañ,- da zizober kalz muioc'h eget da ober, da ziskar kalz muioc'h eget da sevel. Hag en ur skignañ ur gelennadurezh nevez, e rankomp stourm war un dro ouzh ar gelennadurezh kozh. Pe e vo evel hadañ war ur bod-spern, ha gortoz un eost fonnus.

Diarbenn spered Bro-C'hall, eno emañ an dalc'h evidomp.

Roparz HEMON, Breizh hag ar bed 1925.

22.

## LOGOTA

Mat, en noz-mañ, kavet 'm eus petra eo logota.

Edon moredet e'm bouteg, evel boaz, pa glevis un trouz munut-munut o tont diwar ar bank, e penn an daol. Sevel a ris didrouz war va divhar a-dreñv ha sellout. Ul loenig krenn, aliv gant an noz, a rede hag a zirede en-dro d'ar bruzun bara a oa kouezhat aze, pa oa bet torchet an daol goude koan.

Un drivliadenn espar a santis o redek e'm izili. Evel pa vije aet holl nerzh va buhez e'm daoulagad da sellout hag e'm faviou da sailhañ. En ul lamm e voen war al loenig. Gwic'hal a reas pa ziskennas warnañ va c'hraban. E sammañ a ris e'm genou hag, evel ma tifrete, e stardis mui-oc'h-mui va c'harvanoù warnañ ken na fiñvas mui. N'oa ket aet kuit ar vuhez dioutañ koulskoude. Santout mat a raen. Diskregiñ a ris neuze ha lakaat al loenig e'm bouteg, va fav warnañ koulskoude.

ABEOZEN, Biscousig. kazh an tevenn 1954.

23

## AR C'HORF MARV

Mouskanañ a rae c'hoazh Yun goude ma voe tan en e gornad

ha ma voe darev da gemm rod d'ar c'harr. Hemañ a oa eus seurt ar c'hirri lostek, evel ma lavar ar ganfarded, enno lec'h evit daou zen hepken, hag ur c'houfr ledan a-dreñv. Gant soñj kavout ennañ ar c'hrog-krik, an talar-tro, hag an holl vinviou ret, e tigoras Yun ar c'houfr hag e kejas ouzh teirvet souezhadenn an devezh. Hounnezh ne oa ket nebeut a dra. E-kichen div valizenn vihan, edo korf marv ur gwaz tamolodet divalav. E benn a oa koeñvet ha glas. Saouzan bras a grogas e Yun ken ma chomas en e sav hep fiñval muioc'h eget ur peul. Digeriñ a reas e c'hen-ou evel un inosant oc'h ankounac'haat e gorn karet hag e voe darbedik da hennesh terriñ war an hent. En e zorn e tapas anezhañ ku-ha-ka dres kent ma tizhfe an douar. Da heul an degouezhadenn-se, ur bomm gwrez a bignas ennañ, hogen pa voe tremenet ar fromadenn e oa sklaer e spered adarre. Hep mui gortoz e serras ar c'houfr hag e azezas war ribl ar foz o sachañ war e gorn adc'hwezhet an tan ennañ.

Yann-Vari KERWERC'HEZ, En ur rambreal  
1943.

24.

## KENT DIZOUARAN

Ne oa ket a-walc'h soñjal monet da redek bro: ret e oa ivez kemer preder a glask ul lestr edan lakaat da ouel.

Anzav a ran e'm boa un tammig doujañs: rak ne oan ket boas ouzh ar mor. Met lavaret 'm boa va ger, ha va c'halon ne'm laoske ket d'em zislavarout. Me a yeas a-benn d'ur porzh-mor, ha dre un taol-degouezh e kavis eno paot a dud, a oa douget evel don d'ober an hevelep tro-vale. Gwir eo, n'edont ket holl gant an hevelep mennoz: rak darn a oa engortoz a gavout an tu da dolpañ danvez; darn all a yae evit terriñ o c'hoant da

welout bro; rak, evel ma ouzoc'h, tud yaouank a vourr bale ha redek bro pell ha kichen.

Yann MARION, Enez ar Vertuz 178.

25.

## MAMM AN EMSAVER

Goude bezañ bet er prison, e voe taolet er-maez eus ar Skol-Veur. Ha pa zistroas da di e dad e voe kavet e oa klañv e skevent. Tapet an dorzhellegezh gantañ en toull. Setu stag neuze e gerent da zebriñ o zammig gwenneion evit e bareañ. Eñ a bareas. Mat a-walc'h. Met e vamm, blin evel ma oa, a dapas gantañ ar c'hleñved. Ha gortozit, ne oa ket a-walc'h. Pa oa e Paris en doa graet anaoudegezh gant ur plac'h yaouank. Un hanter foll eveltañ: skrivañ a raent e brezhoneg an eil d'egile. Ma, ar vamm, e par ar marv, a c'houlennas gantañ chom hep skrivañ da hounnezh ken, a aspedas anezhañ da chom hep skrivañ da hounnezh ken. Mont a reas ar paotr e konnar. Trouz a voe. Ne oa ket mui kreñv a-walc'h ar vaouez paour evit herzel. Mervel a eure en noz-se o skopañ gwad.

Per DENEZ, Maronad 1952.

26.

## MEVEN MORDIERN

Bremañ m'eo marv an den meur-se e komprenimp marteze petra a dleomp dezhañ. Ne fell ket din, anat eo, bihanaat talvoudegezh ha pouez skridoù "Skol Walarn"; hogen ne dleomp ket ankounaat n'he deus gallet ar skol-se lakaat da vleuniañ al lennegezh kaerañ hor boa biskoazh (ma lakaer a-gostez Barzhaz Breizh, Kall-

oc'h ha Malemanche), nemet dre ma kave dija ur yezh pinvidikaet, gwevnaet ha poellataet gant labour start "Skol Sant-Brieg" pe "an X<sup>3</sup>". Roparz Hemon e-unan en deus lavaret bepred e oa ar Skotla diazez ar brezhoneg lennegel nevez, evel m'eo ar Vibl diazez ar c'hembraeg. Hag e-touez an X<sup>3</sup> en deus Meven Mordiern ur renk dieil. Dre ma oa Gall ha nann Breizhad evel ar re all, ur Gall miret gantañ perzhioù mat hepken ar C'hallaoued: sklaerder ar mennozioù hag urzh en e labour. Dre ma oa ivez muioc'h "prederour" eget Ernod ha Vallee; ha mard eo kenlod e "tadelezh" ar brezhoneg evel yezh a sevenadurezh, eñ eo en deus diskleriet fraezh ha poellek ar mennozioù-stur a rae an X<sup>3</sup> diouto hag a chomo mennozioù-stur Kadourion ar Brezhoneg.

Arzel EVEN, Meven Mordiern, den skouer 1949.

27.

## TAOLENN A FAMILH

El liorz e main holl. El liorz vihan a-dreñv an ti, ken binan ma n'eus plas enni nemet evit div wezenn bechez hag al letonenn m'emain holl azezet. Ne vern, ur c'hañs eo kaout ul liorz p'emeur o chom e kêr.

Azezet emaint lod war gadorioù-brec'h. lod war ar geot. En tu kleiz din emañ Maela, ha pelloc'h Andrev, he gwaz. A-dreñv dezho, er wenedenn a ra tro ar c'hlaenn, emañ o babig en e garrigell. Ur babig pevar miz, a gresk mat bremañ, goude bezañ roet un tammig trubuilh d'e gerent, hag a grog d'ober trouzioù liesseurt, hag a zo fur a-walc'h. O-zri emaint o terc'hel ur c'horn eus al letonenn. Er c'horn pelloc'h emañ mestr an ti azezet er geot. Emañ e gi yaouank hag e vugel

eitek miz o treiñ hag o c'hoari en-dro dezhañ. Ar c'hi war-lerc'h ar bugel, ar bugel e divvrec'h e dad, ar c'hi war varlenn e vestr, hag ar bugel e-kreiz al letonenn. Ar bugel-se, eitek miz, en deus seizh dant, met ne gomz ket c'hoazh. Ne oar lavarout nemet trouziol ivez, met trouziol liesseurtoc'h eget re ar babig pevar miz. Reizh eo ne gomzfe ket c'hoazh d'e oad forzh penaos. A-zehou da vestr an ti emañ azezet, war ar geot ivez, Onenn, na gwaz na bugel dezhi; gwisket eo gant ur sae liv ar fuksia, pezh a glot mat gant he blev melen. En he c'hichen emañ Bernez, na gwreg na bugel dezhañ kennebeut. Evel-se edont urzhiet e karrez en-dro d'al letonenn, pa'z omp degouezhet, Alan ha me.

Pierrette KERNOAL, Roazhon bepred 1970.

28.

AR FOK

A-greiz-holl ar paotr yaouank a chomas a-sav dirazi.

- Petra zo, emezi.

Mousc'hoarzhin a rae hepken. Sellout a reas buan en-dro dezhañ hag he bountañ e korn un nor. Fladañ a reas warni ha pokat war he muzelloù. Santout a rae e zorn a-dreuz he sae skañv e kleuz he livenn gein. Klask a reas en em zistrobañ dioutañ. Ne fiñve ket. A-benn ar fin e tiskrogas.

- Pemoc'h, emezi, ruz evel ur c'hogig hag o krenañ, pemoc'h, pemoc'h, pemoc'h!

Ar paotr a selle outi en ur vousec'hoarzhin, e zaoarn sanket e godelloù e vragoù strizh. Splannoc'h e oa ar gleizenn e-kichen e lagad.

Skopañ a reas-hi neuze e-kreiz e fas. Ar paotr a yeas kuit hep mall, un tammig a-gil, dalc'hmat e zaoarn en e c'hodelloù, ur mousc'hoarzh war e ziveuz.

Ur paotr en doa poket dezhi. Un doare lorc'h a save enni

bremañ, ur vacuez e oa, unan wir. Gant he mouchoer e nastas ar ruz a oa aet a-dreuz war he genou. Petra lavarfe Lilianna warc'hoazh pa gontfe dezhi? Mall he doa da warc'hoazh.

Ronan HUON, An irin glas 1966.

29.

AR VARC'HEION

Hag al loen ha me monet gant hon hent a-hed an deiz, tre betek serr-norz. Degouezhout a reomp e-tal ur groaz savet ouzh ur beg hent. Neuze ez arrest al loen evit chom da selaou ouzh ur bare roñseed o pevarlammiñ gant paot a drouz. Ha me gwelout ur marc'heg hag e-leizh a roñseed gant marc'heion warne.

A-dal ma'm gwel ar marc'heg e tiskenn diwar e jav hag ar varc'heion all ivez evit va degemer. Ha goude din bout eñ saludet da'm zro, ez a da'm ambroug d'e gastell evit reiñ din boued ha lojeiz.

Hag eñ ha gervel ar floc'h, kemennet dezhañ kas ar roñseed gantañ ha kempenn ar c'hastell eus ar gwellañ. Ar floc'hed a ya d'o zu hag ar marc'heg a chom etaldon gant e bare hag int d'ober din biskoazh brasoc'h enor.

Yann-Vari HENNU, Ar Graal santel 192.

30.

ABEGOU C'HWITADENN AR C.E.L.I.B. HAG AR M.O.B.

Ma n'en deus ket graet ar C.E.L.I.B. al labour en dije gallet ober, eo peogwir en deus klasket diskoulmañ kudennoù armerzhel Breizh evel kudennoù ar rannvroioù eus Bro-C'hall. Goulennet en deus digant gouarnamant Paris "strivoù dibar" evel istor al "lezenn-stur evit Breizh". Met gouarnamant

30  
Paris en doa ur raktres evit Bro-C'hall a-bezh. Neuze ne voe graet netra evit Breizh nemeti. En em welout a reont evel Gall-  
aoued eus Breizh o c'houlenn digant ar Stad C'hall klask gwell-  
aat an traoù e Breizh. Ne bledont ket gant ar politikerezh peo-  
gwir e soñj dezho ez eus e Breizh ur gudem armerzhel hepken.  
Hag amañ emañ ar fazi brasañ a reont.

Abegoù c'hwitadennoù ar M.O.B. n'int ket heñvel. Flediñ  
a ra gant ar politikerezh. Mennoz ar gevreadelouriezh a zifenn.  
Met n'eo ket resisaet ar mennozioù. N'en deus ket ur pal resis,  
ha mar lakaomp ez eus unan (Breizh damemren e-barzh ur Frañs  
kevreadel) ne zeuont ket a-benn da spisaat an hentoù, an tuioù  
da gemer evit tizhout ar pal-se. Ha mar chom diresis ha diefed-  
us ar pezh a reont ez eo peogwir ez int azezet etre div gador:  
ne zibabont ket etre ar framm gall hag ar framm brezhon. Fell-  
out a ra dezho gwellaat, kemmañ marteze, stad an traoù e Breizh,  
met ne zeuont ket a-benn d'en em zieubiñ diouzh ar frammoù gall,  
diouzh al levezon c'hall.

EMSAV 6/147 1967.

31.

#### FREDERIOU AROBIN

Dibaouez ha peuzheñvel bepred, e kendalc'he an amzer da  
dremen. Bep bloaz ha dre ma'z se e-biou pep mare anezhañ, e  
kaven d'ober an hevelep labourioù. Bep bloaz ivez e'm beze,  
tost da vat, an hevelep eostoù. A-wechoù, koulskoude, e vezen  
lakaet nec'het pa zegouezhe ganto bezañ disteroc'h eget boaz  
pe pa'm beze ur c'holl bennak e-touez va loened. E'm c'halon  
e tiwane levezon o welout va labourioù graet mat, oc'h arv-  
estiñ ouzh ar vro gaer m'edon o chom hag o kemerout dudi gant  
fringadennoù va loenedigoù.

War ar peul a dalveze din da galander, e verken bep ab-  
ardaez, gant un ask, an devezh a veze o paouez tremen. En ur

31

ober ar gont eus an holl askoù, e kavis edon ouzhpenn tri bloaz  
warn-ugent a oa o chom e'm enez. Yaouank-flamm e oan pa voen  
taolet warni ha bremañ edon e barr va oad. E-pad an tri bloaz  
warn-ugent-se, ne heuilhis morse ribl va enezenn hep sellout  
ouzh ar mor, gant ur galon c'hoantik ha birvidik, da glask warn-  
añ al lestr a c'hallfe va c'has gantañ. Hogen biskoazh ne welis  
netra nemet eonenn arc'hantet ar gwagennoù pe gein ur morhoc'h  
bennak o c'hoari en dour.

Daniel DEFOE, Abrobin  
(tr.br. Yeun ar GOW, 1964)

32.

#### ORIN AN ISDIORREADUR

Ganet eo bet an isdiorreadur diouzh al levezonoù embregat  
gant armerzhioù treusfurmet dre ar "Reverzhi C'hreantel" war  
armerzhioù ar broioù n'o doa ket degemeret anezhi. A-raok ar  
Reverzhi C'hreantel ne oa ket, d'hon menno da nebeutañ, a isdi-  
orreadur gwirion, peogwir ne oa ket a ziorren pe gentoc'h:  
kudennoù an armerzhioù rakgreantel ha rakkevalaour a oa disheñ-  
vel. Setu perak ne c'haller ket lakaat keñver-ha-keñver stad ar  
broioù isdiorreet en hon amzer ha hini Kornogeuropa en 18<sup>th</sup> kant-  
ved.

Disheñvelderioù don a oa evel just etre an armerzhioù rak-  
greantel, met un dra oa boutin dezho: bez' e oant kempouezet;  
ha hogos digemm; kempouezet e veze an armerzh gant ur stuz-  
egezh henvoazel (evel ma oa e maezioù Breizh betek derou an  
20<sup>th</sup> kantved). Ne oant ket digemm e gwirionez, met ar c'hemmoù,  
pa oa anezho, a c'hoarveze goustadik a-walc'h; kemmoù trumm a  
c'hoarveze a-wechoù met degaset e vezent gant ar brezel ha ne  
oant ket frouezh al levezonoù armerzhel: aloubidigezh Amerika  
gant Europiz he doa freuzet da skouer stuzegezhioù hag armerzh-  
ioù ar pobloù indian kemm pe digemm; kempouez e oa etre ar

boblañs hag ar c'henderc'h, etre ar c'henderc'h hag ar c'halvez-erezh.

Per PENNEK, Tonkad 66.

#### STUDI AR YEZHONIEZH

An dud a ya da heuliañ kentelioù keltiek er skolioù-meur ne'm eus truezebet outo. Ne vern penaos, koll amzer a rafent. Ha gwelloc'h eo bezañ azezet dirak "Banvez Bicriu" pe "Le Mirouer de la Mort" eget e korn un davarn dirak ur werennad hini kreñv. An dud-se zo tri rummad anezho:

- a) plac'hed yaouank deuet er skol-veur da zimeziñ;
- b) kabitened kozh war o leve;
- k) studierion, c'hoant ganto kemer lec'h ur c'helenner keltiek kerkent ma varvo unan e Roazhon pe e Paris.

Siwazh, e-touez an dud-se e kaver a-wechoù tud deuet a-zevri da studiañ. Darn anezho,- piv a gredfe pegait ez a fiziañs ar yaouankiz,- deuet e spi da zeskiñ ar brezhoneg pe ar c'hembraeg.

Me a gav din n' eus nemedon betek-henn he defe graet ar yezhoniezh vad dezhañ, dre bellaat ac'hanon da viken diouti. Ar yezhoniezh giz ar skolioù-meur, a lavaran.

Roparz HEMON, Studi ar yezhoniezh 1928.

#### HUNVRE AR ROUANEZ

Strafulhet on bemnoz gant hunvreoù, abaoe m'eo digêriet va mab, e penn e soudarded, da zrastañ douar ar laoniz; nepred, avat, ne welis, ken fraezh, hunvre heñvel ouzh hini an noz diwezhañ: selaou. Div vaouez, gwisket kaer, a voe dirak va daou-

lagad. Unan a zouge brozh ar Persezed, eben hini an Dorizadezed. O-div e oant trec'h da vaouezed bremañ, ken gant o ment, ken gant o c'hened dinamm. Evit dezho bezañ c'hoarezed kenouenn, e raent o annez, unan e bro-Hellaz, peogwir e oa he lod, eben war zouar ar Varbared. Tabut a oa etrezo, war a gredis, ha va mab p'o gwelas, a glaskas derc'hel warno hag o didaeriñ... e-doug m'o sterne ouzh e garr ha ma lakas ar vazh-yev war o choug... Hag unan, neuze, ha c'hwezhañ, lore'h enni gant he stern, ha kinnig ur genou sentus-kaer d'ar rañjenn, e-pad ma tripe eben, ma torre a-daol-trumm, gant he daouarn, ar sugelloù he stage ouzh ar c'harr, ma stleje herañ d'he heul daoust d'ar wesken, ha ma rae, evit echuiñ, daou damm eus ar vazh-yev.

Kouezhet va mab; ha sed e dad a-sav en e gichen, o kinnig trueziñ warnañ; raktal m'en gwel, avat, e rog Serses e wiskamant.

AESC'HUILOS, Ar Bersed  
(tr.br. Youenn DREZEN, 1928)

#### UR GALON DIR

Kalz ac'hanomp a voe mac'hagnet; me, evit va lod, a'm boa bet un taol baionetez e'm morzhed. Henezh, avat, an hini en doa roet ar mestr-taol-se din, ne zaleas ket da vont d'ar bed all; ur Roskoad yaouank e'm c'hichen, a dorras e benn outañ gant un taol krog. Daoust da se, va gwad a rede puilh, saflikañ a rae e'm betoù dre ma valeen; koulskoude ne raen van ebet, ne ouien ket zoken e oan tizhet. An neb n'eo ket bet en emgann ne c'hallo biken kompren petra eo an den paour e-kreiz an tan, war an dachenn. E zaoulagad a luc'h en e benn evel daou gef-tan, an eonenn zo e korn e c'henou, disec'h eo e vuzelloù, e fronelloù zo digor hag a zeu evel moged anezho, e dal zo rouf-

ennet, e gorf a-bezh a gren gant e herrder, dianalet eo, ha koulskoude ne ehan da redek ha da skeiñ pa gav e du; kollet eo e benn hag e skiant gantañ. Lod a lavar eo c'hwez ar poultr a ra kement-se. Koulskoude gwechall, a-raok m'oa poultr, fuzuilhoù ha kanolioù, en em ganned gant kement a gonnar ha bremañ. Me gredfe kentoc'h e teufe, e-pad an emgann, an Aotrou Doue da zilezel an den da heul sioù fall e galon, da ober droug dezhañ e-unan ha da dud na anavez ket zoken, abalamour ar brezel zo unan eus e walinier. N'eus forzh, evidon-me a gav din e'm boa kollet va fenn, ne'm boa son rak netra, ne raen van a netra. Gwelout a raen tud, hag a anavezen mat, astennet war an douar, mac'hagnet, hag ez aen e-biou dezho evel pa na vijent ket bet eno; va c'halon a oa deuet da vezañ dir. Ne'm boa ken youl nemet lazhañ ha diskar soudarded muiañ me c'hallfen.

Lan INISAN, Emgann Kergidu 1903.

MOJENN AL LEC'H-MEUR

Un deiz e tremenas dre eno daou veajour, ur paotr hag e vamm, hir ha treut, diarc'hen, gwisket e truילוù. Ar paotr a oa war e benn ur gurunenn spenn hag en e zaouzorn hag en e zaoudroad e oa merk an tachoù. Ar vamm a oa div roudenn don a-dreuz he divjod dindan he daoulagad, kement he doa gouelet. Goulenn a raent digant tud al Lec'h-Meur un tamm bara dre druez. Met an dud-se, pa na ouient ket petra eo ar glac'har, ne ouient ket kennebeut petra eo an druez. Ha kaset an daou glasker kuit dre ma oant paour ha disneuz.

Antronoz e tigoras ar reier dindan ar gêr vras, hag en he lec'h e teuas d'en em astenn al Lenn a weler hiziv c'hoazh. Jezuz a felle dezhañ sankañ an holl annezerion en ifern, met e vamm a bedas anezhañ, peogwir o doa pec'het dre zianaoudegezh

kentoc'h eget dre falloni, d'o lezel e buhez. Chom a rejont avat e strad an dour. Lostoù-pesked a greskas warno. Emañ bugale-vihan o bugale-vihan atav e don al Lenn, hag ivez e don ar stêrioù hag ar mor. Gwalet e vez hini pe hini anezho ur wech an amzer.

Roparz HEMON, Mari Vorgan 1962.

KROGAD E PREDVA AR SKOLIDI

- "Brasoc'h eo da jelkenn eget va hini-me. N'eo ket reizh. Ar jelkennoù brasañ d'ar re vrasañ, ar jelkennoù bihanañ d'ar re vihanañ. Setu!"

Egile avat, evitañ da vezañ kalz berroc'h e vent, a oa kreñv ha kalonek. Paket en doa krog e blev Yun gant e zorn dehou. En e sav e oa aet Yun, hogen Benead Bondu a oa chomet a-istribilh ouzh e vlev hag o winkal-diwinkal ouzh divc'har e enebour. Evit en em zifenn en doa krapet Yun e strad bragoù Benead Bondu, hag ouzh e zibradañ en doa miret outañ da nebeutañ a reiñ taolioù treid. Siwazh dezho, re e oa evit kempouez Yun, ha kouezhet e oant o-daou dindan an daol o teurel al listriañ d'an douar. Evel pa vefe bet ur gourc'hemenn gortozet ganto, abaoe derou an emgann, holl genskolidi ar sal-debriñ gwitibunan, hag int laouen betek-henn o youc'hal hepken "Sko kalet", "Torr e benn", "Dao dezhañ a oa en em daolet trumm hag a-benn kaer da reiñ skoaz d'ar stourmerion. Pa oa deredet ar vistri-studi, o doa kavet ur veskadeg diaoulek, un touzmac'h-ifern, ha daou pe dri arzour o c'hoari pep hini diouzh e du stlepel asiedoù warnij a-dreuz ar sal. Ur c'hard-sur a oa tremenet kent ma renas ar peoc'h adarre. Ne oa ket chomet ur pezh listriañ didorr.

Yann-Vari KERBERC'HEZ, En ur rambreal 1943.

"Ya, eme Maout da Oanezig, sell pegen kaer eo va mammig. Koantik eo he fenn flour; kuñv eo he lagad, daoust dezhi lavarout "Me 'venn" gant he mouezh korzennet-kaer. Rak mamm zo rouanez en he zi. Ha n'eo ket hi a zo e penn ar bagad? Fuih ha hir, he gloan a ra dezhi evel ur vantell vistr; ha kemenerion ar vro a c'hell kemer skouer war he zrolinenn - gar hir oc'h ermaeziañ ur vantell verr ha tro enni - biskoazh ne zeuint a-benn da breñañ he c'hened. Hi eo an hini voanañ hag an hini gaerañ eus ar c'hraouiad".

Evel-se e komze Maout, bugel tourzh helavar, gant Oanezig, an dañvadezig kenad dezhañ, ouzh skeud toenn kraou Koulmir. E-keit-se Itronezed Kêrveñved zo evel rouanezed en o glad glasvezek. Plijout a ra dezhe o amez maezel, ma frond ar foenn, ma'z eo fresk ar gouzer, ha ma vez blazet ken mat ar melchon en-dro dezhañ! Feuriñ ha daskiriat a reont e koulz hag e kentel, ha da c'houde kousket e peoc'h.

Mari ARSANT, Koulmir  
(tr.br. abENNEZ 1964)

## PIV EO AN EMSAVERION?

Ul lec'hienn voutin eo er framm gall lavarout ez eus daou seurt Breizhiz: ar re varrek, a ya da Paris, ar re zister, a chom e Breizh. Roll an Emsav eo krouiñ un trede seurt: Brezhned varrek o chom er vro, - ha n'eo ket gant ar mennad da reiñ lañs dezhi e diabarzh ar framm sujer, met gant ar mennad da grouiñ ur framm brezhon ha da freuzañ ar framm sujer. An dud-se zo pal an deskadurezh vrezhon o c'hrouiñ. An dud-se ne ziwanont ket dre un trivliad berbad na dre hent ar rambreadennoù

dangorelour, met dre un embregerezh hirdermen. Uhel e rank bezañ o barr deskadurezh, ha n'eo ket hepken o deskadurezh difetis, met o deskadurezh emouiziek fetis. An dud-se hepken zo gouest da anaout pobl Vreizh ha dreist-holl da lakaat pobl Vreizh d'en em anaout evel ma n'eo bet anavezet gant den araso. O c'hefridi a wastadourion zo kevout an diskoulm d'an enkadennoù hag o diskoulmañ; seveniñ ar galloud brezhon ha pellaat ar galloud sujer; ha dreist-holl en tu all d'an disubidigezh bleniañ ar vro en he gorreidigezh.

EMSAV 27/72 1969.

## ROLL ISTOREL AL LENNEGEZH

Adal an amzerioù istorel kentañ ez eo anat an dalvoudegezh a roer d'al lennegezh. Kemsromp, da skouer, kanennoù an Iliados hag an Odusseia e Bro-C'hres an henamzer. Petra zo enno moarvat nemet danevelloù-meur diwar-benn hanterzoueed, gouroned ha harozed denslaet. Un orin kravezel a vefe enta d'ar skridoù-se. Hogen un implij all o deus tennet ar C'hresianed diouto: un danvez kentelioù a-benn heñchañ ar re yaouank er vuhez; Odusseus a zene da vezañ neuze an den, pe da vihanañ, an den gresian skourel, kalonek ha gwidreüs war un dro, pennek ha dalc'hus, kadarn ha dilu en hevelep amzer. Kemend-all zo gwir diwar-benn harozed an Iliados e-lec'h e teske ar gresian yaouank peseurt perzhioù a ranke kaout ar c'hadour galvet deziz pe zeiz eus e vuhez da zifenn e vro dre an armoù.

Danevelloù S.A.D.E.D. 1965.

Un deiz, edo gward ar plac'h yaouank o kignat ul leue war an erc'h, er-maez, e-kreiz ar goañv, d'e servijañ dezhi, pa welas-hi ur vran oc'h evañ ar gwad. Neuze e lavaras Deirdre da Leborc'ham :

- Ar paotr a garin a vo unan en devo an tri liv-se warnañ : e vlev evel ar vran, e jod evel ar gwad, e gorf evel an erc'h.
- Pep madelezh dit, eme Leborc'ham, N'emañ ket pell dicouzh-it. Emañ en ti tost ac'han. Noise eo, mab Usnac'h.
- Ne vin ket yac'h, emezi, keit na'm bo ket e welet.

Hag edo Noise e-unan war voger Emain o kanañ. Heson e oa mouezh tri mab Usnac'h. Nep buoc'h ha nep loen he c'hleve a roe un drederenn a laezh muioc'h. Nep den he c'hleve a oa leun barr e galon a beoc'h hag a levenez. Akuit-meurbet e oant er stourm. Kaer o dije bet Uladiz en em vodañ en-dro dezho en ul lec'h hep-ken, ma vijent o-zri kein ouzh kein, ganto o-zri e vije chomet an trec'h, ken dreist e oant d'ar re all da arsailhañ ha d'en em zifenn. Ken prim ha chas e oant da vont war-lerc'h al loened gouez ha da zielec'hat an demmed diwar red.

Edo Noise e-unan-penn war ar voger. Deirdre a dec'has dicouzh an ti hag a dremenas dirazañ.

- Brav eo, emezañ, an annoar a dremen e-biou dimp.
- Ret eo kaout annoared bras, emezi, e-lec'h n'eus ket a dirvi.
- Ganit, emezañ, emañ tarv ar vro, roue Uladiz.
- Dibab a garfen etrezoc'h ho-taou, emezi, hag e ve da gan-in kaout ur c'holsig evel-dout.

Tri plac'har an danevellañ  
( Kerc'h an Henvojennoù a Iwerzhon,  
tr.br. Roparz HEMON 1927 )

Ha koulskoude, e Gwalarn eo e kav politikerezh brezhon hon mare e andon hag e ziazez muioc'h eget e forzh petore luskad politikel eus ar mare-se, Breiz Atao zoken. Pennaos kompren an dra-se ?

Sklaer e teu da vezañ ur wech ma komprenere Istor Breizh en 20<sup>t</sup> kantved evel istor un dispac'h. Un dispac'h, da lavarout eo krouidigezh ur vro nevez gant tud en em grouet nevez. Meur a zoare zo da empennañ dieubidigezh ar vro. Hon politikerion gentañ, komz a reomp eus hon politikerion vroadel, a venne reiñ he frankiz da Vreizh; hogen Breizh o mennoz oa Breizh evel ma c'halle hec'h anaout o daoulagad a dud sujet; ar frankiz a vennent reiñ dezhi oa ar frankiz evel m'he danzee o hiraezh d'an amzer gozh, ar frankiz evel ma tlee bezañ e grez Nevenoe pe Yann 4; en ur ger, ar vennerion e oant oa Brezhoned ar sujidigezh, da lavarout eo tud an tremened, - an dud sujet zo dre ret tud an tremened. Dieubiñ evel ma vezent a oa kempenn, palastrañ ur frankiz a-wechallouzhur vro sanket endeo en tremened. Gwirion e oa avat o lusk d'ar rezid, - diouer a rae dezho al lavar d'e ez-taoliñ. Dindan e vount e tlee frailhañ ar gwiskamant kozh; Gwalarn neuze a zindas.

EMSAV 6/143 1967.

Un oabl digatar a sav e vantell c'hlas ledet uhel a-dreist an douar; gwrez an heol benniget, o parañ war ar bed, en em sil da dommañ ar maeziou, hag ar gwazhiou-dour a hiboud sklaer en ur redek dre parkoù ha foenneier. E-barzh al liorzhoù, ar bok-edoù a sav o c'horzennoù kizidik, hag a zigor o c'halon da

c'hoarzhin: o deliennoù brizh-livet en em led, hag o c'hwez-vat a red tro-war-dro war askell an aezhennig klouar. Bokedoù koant, a bep liv, a bep ment! Nag a vokedoù! - Va faour-kaezh Youenn, mar befe ret dit c'hvesa kement hini eus ar bokedoù-se, neuze, paotr, n'emaout ket c'hoazh war-nes ober da choaz! ... Sell aze ar sperm-gwenn war ar c'harzh o c'hoarzhin, e-kichenik al lireu glas ha gwenn; sell anont ar rouanez, tost d'ar gwezvoud kildreiñ; sell c'hoazh ar varlenn, al lili gwerc'h, hag ar rozenn ken koant war he zrojenn zreinek, prest da flammañ ar gwall-er.

Ivon KROG, Ur sac'had marvailhoù 1924.

UR BARADOZ-AN-DOUAR

Me a domme buan ouzh ar merc'hed koant, hag unan amañ er c'hastell he doa piket din va c'halon. P'o doa paret va daoulagad war an dalemnoez vihan 17 vloaz a oa ouzh hon degemerout e-kichen he mestrez Anna Gruffydd, e'm boa lakaet e'm fenn tostaat outi en un doare bennak da anzav va c'harantez.

Me: ne oa ket brav toullañ evezh an dalemnoez kozh, a ziwalle he diskiblez evel ma c'hor ur yar he folezi. Stlejañ a raen va c'hammedoù en-dro d'ar c'heginoù da esañ komz hon daou nemetken, ar pezh a oa aze a-walc'h din e yezh ar vro... Dindan ar gwez bras bodennet, 'drek ar brouskodoù tev hon diwalle di-ouzh an daoulagad, e veze brav dimp kontañ an eil d'egile... Maggie a rede diganin evel un heizez ha me war-lerc'h: pa dapan krog en he brozh, e veze bec'h da gaout ur pok:

"Dear me", a glemme e saozneg, ha goude: "Cywillydd", e kembraeg, evel pa vije lavaret e brezhoneg: Foesi, 'peus ket mezh?

TALDIR, Envorennoù yaouankiz 1942.

AR C'HREUNENN ED

Aet e oan da c'houlenn aluzon a zor da zor war hent ar gêriadenn, pa'n em ziskouezas da garroñs-aour splann evel un hunvre, hag ec'h estlammen da c'houzout piv oa hennezh, Roue ar rouanez.

Kreskiñ a reas va spi hag e soñjen: sed echu an deizioù fall, ha prest en em zalc'hen dija evit aluzonoù largentezus ha pinvidigezhioù strewet er poultr a bep tu.

Chom a reas a-sav ar c'harroñs e-lec'h ma oan. Da sell a gouezhas warnon ha diskenn a rejout o vousec'hoarzhin. Santout a ris e oa deuet erfin evidon chañs va buhez. Hogen a-daol-trumm ec'h astennjout da zorn dehou 'n ur lavarout: "Petra 'c'h eus da reiñ din?" A! Peseurt c'hoari rouel eo astenn an dorn d'an truant evit truantin! Abaf e chomen en entremar. Erfin eus va bisac'h e tennis gorrek ur c'hreunenn ed hag he reiñ a ris.

Pegen souezhet e voen pa gavis da noz o tisac'hañ va c'hest ur c'hreunenn aour e-touez ar greun dister. Leñvañ a ris neuze daeroù c'hwerv. Ferak ne'm eus ket bet kalon a-walc'h evit reiñ dit pep tra.

Rabindranath TAGORE  
( tr.br. Maodez GLANNDOUR )

E PIRIEG

Pignat a rejomp e-barzh e garr-tan. Ur gamdro a rankjomp ober dre an douaroù, rak berzet e oa hedañ hent an tevenn. Treuziñ a rejomp Maez-kaer sorennet dindan ar glizhach ha skeiñ neuze etrezek Pirieg a ziraezjomp e-tro teir eur hanter.

Sioul marv e oa ar vourc'h, kloz an holl stalioù anni, e-giz pa vije bet ar vosenn er vro. Kaer hor boe kantren dre ar straedoù bihan, ne welemp dre-holl nemet stalafioù serr. Distreiñ a rejomp d'ar porzh: eoriet e oa ar bigi e-tal ar chaoser; hervez

doare ne oant ket er-maez en deiz-se.

Krog e oa an heol da zispakañ ha lugerniñ a reas ar mor en diwezh. Gouwelout a rejomp enez Dumed er c'hreisteiz; er reter en em astenne ar glannoù hir war-du genou ar Wilur en tu all da dormadoù Penn-ar-Staen: e-skoaz dimp, dreist d'ar mor o c'hlazañ, e paras ad Beler ha Damgan.

Youenn OLIER, E penn an hent 1963.

47.

#### BEZAÑ BREZHON GWECHALL HA HIZIV

Ha brezhon eo Naonediz? Ar goulenn-se zo d'ober war un dro hag en hevelep doare e Brest, en Oriant, e Sant-Brieg, e Roazhon hag e pep lec'h e Breizh. Gant gerioù all: ha brezhon eo Breizhiz?

Gwechall, bezañ brezhon oa kement ha bezañ eus ur rannvro diçuti hec'h-unan, eus ur gevredigezh koueriadek henvoazel war he zremenven. Ar ster-se a oa deuet ar vrezhonelezh da gaout dre berzh m'edo Breizhiz o kejañ ouzh ar bed arnevez greantel tra ma kouezhe en o foull elfennoù diwezhañ ar gevredigezh vrezhon henvoazel. Da heul emzizalc'h ar renkad-ren, ar Vrezhonez zo aet tre en oadvezh greantel unan-hag-unan, hep bezañ prientet, pep hini o rankout en em zibab evel ma kave tu evit treuzvevañ. Diwar se ez eo aes kompren perak e lakaer e-geñver brezhonelezh ha tremened: treuzfurmatur ar gevredigezh vrezhon en ur gevredigezh arnevez gallekaet a roe tro da lakaat e oa distremenet, dispred-ét kement tra a denne da Vreizh ha da Vreizhiz; n'he doa pobl Vreizh nemet steuziañ d'ober pe, resisoc'h, e oa he steuzidigezh priz an araokaat, priz ar vuhez.

Liammet oa seurt gweladur eus an traoù ouzh ur saviad politikel ha kevredigezhel dibar: an tremen eus ar gevredigezh vrezhon henvoazel d'ur patrom a gevredigezh c'hreantel. Bremañ avat,

eus ar gevredigezh henvoazel-se ne chom nemet aspadennoù. Petra a dalvez bezañ brezhon hiziv?

Hiziv, an dislavar etre kaout perzh er gevredigezh c'hall-ekaet ha kaout perzh er brezhonelezh ne anad ket evel agent. En em ziskleriañ brezhon zo kement ha dibab un emgann: hini an di-eubidigezh hag ar gwiriziennadur evit holl Vreizhiz; ha disteur-el unan all: hini an distro d'an tremened (armerzhel, kevredigezhel pe sevenadurel). N'eo ket dre zegouezh e vez santet lemm-ouzh-lemm er vro-mañ an ezhomme eus an emgann-se: rak enteuzadur Breizhiz er gevredigezh c'hall, mar en deus roet dezho an tu da freuzañ karc'har o c'hevredigezh henvoazel, n'en deus ket roet dezho an tu da emsavelañ na da wriziennañ en Istor evel m'o deus gwir d'ober. Setu perak ez eo niverusoc'h bemdez ar re a emouestl da sevel ar gevredigezh vrezhon nevez. Diarvar eo ez anavezoz aze Naonediz o emgann.

EMSAV 50/51-52 1971.

48.

#### PEOC'H AN NOZ

Deuet eo serr-noz. Klevout a reer an aezhenn o scurral e deil kizidik ar bezv hag an efl. Peoc'h dre holl. An neb a daolfe evezh piñh a glevfe marteze arnev dibaouez ar brezel o kroezal a-gleiz pe a-zehou. Erwan ne glev ket e gwirionez. Lakaat en deus tan war e gornad butun. Mat en deus kavet e bred. C'hwek eo bet ar gwin ruz d'e ziabarzh. Gant an nerzh hag an tomder daskoret d'e izili, e tispak aesoc'h e spered e eskell ar faltazi. Ledet en deus e ballenn war Féret, sammet bremañ gant ur c'houk strafuilhet.

Bep ar mare, e sell Erwan ouzh e amezeg. Tabut zo bet savet etrezo meur a wech. Buanek eo egile hag Erwan zo pennek. N'eo ket ouzhpenn gwall heñvel o mennozioù. Erwan zo don warnañ levezon ar

skolaj hag e levrioù. Un deiz a zeuio ma ranko anzav, avat, edo kentoc'h ar wirionez gant e gamaladed dizesk eget gantañ e-unan, luziet m'eo bet e spered gant sorc'hennoù levrioù diwirion. Dizeskiñ a ranko ivez un deiz a-benn gouzout. Henozh da vihanañ n'eus anezhañ nemet ur soudard faezh, evurus diwar en devout graet, da zibenn ur gwall zevezh, ur pred a-zoare, evurus da vezañ yac'h ur wech c'hoazh, evurus oc'h eñvoriñ, etre ma par e sell war moged e gorn, o steuziañ gwevn e peoc'h an noz, al lav-arenn-mañ, lennet marteze en ul levr bennak :

" N'eus trec'h ebet par da hini ar Vuhez war an Ankou".

ABBOZEN, Ar bidoniad dour 1942.

GOUDE AN IPERIT

Er c'hlañvdi-red tostañ, stok ouzh gwrimenn ar c'hoad, e lez ar c'hloazidi o armoù hag o bitailh, intret gant an iperit ha mat nemetken d'ober teil. Ar re a c'hell c'hoazh bale a gendalc'h gant o hent; Erwan, stlapet gantañ e bistolenn hag e zrouin er foz, n'en deus miret nemet e vidoniad kafe. E straed bourc'h Giraumont, e chom ur pennad mat war an hent, kanolierion mantret o sellout outañ, hep krediñ tostaat na kinnig tra dezhañ. Piv 'oar, e gwirionez, petra 'dalvez ouzh ur seurt gloaz?

Bep gwech ma sav Erwan e kemer ur gouzougad hir eus e gafe hag, evel-se, e kav da vihanañ un dra bennak da zisteurel, pa vez gwasket gant ar dhwedadennoù didrec'hus.

En ur ziskenn war du Villiers-sous-Coudun, e wel, war ribl an hent, en ur park kaset gant orjal, prizonidi paket ar beure-se moarvat. Hiniennoù anezho a stag da c'hoarzhin goap, pa gouezh ur gloaziad d'an douar war an hent. Konnarañ spontus a ra Erwan. E bistolenn zo chomet ahont er foz. Anez da se di-

aes eo gouzout ha n'en dije ket klasket toullañ ler unan eus ar c'hagnoù-se, frealzet en o frizonerezh gant poanioù tud all, gwisket disheñvel.

ABBOZEN, Iperit 1942.

WAR AN HENT

Re zivezhat e pouezas Goulven war ar vuanerez. Sonoc'h e oa ar c'hraev eget ma krede dezhañ. Diskenn a reas en trede. Er c'horn-pleg e lakaas da c'hoari ar gouleier a luc'has war werennoligoù ar peulioù simant a vevenne ar gammdro.

Bremañ edo war an hent eeun ha n'en doa ket ezhomm c'hoazh a c'houlou. Enaouiñ a reas ar gleuzeurig hepken. Nadoz ar c'honter a bigne da bevar-ugent, kant, kant ugent, kant tregont, kant daou-ugent. Tostaat a reas e zremm ouzh ar werenn evit gwelout fraeshoc'h an hent a-us d'ar rod-vleniañ.

Aon en devoe na zifloupfe, a-greiz-holl, un den bennak diouzh unan eus an hentoù-karr a gase d'ar mereurioù. Ne c'horrekaas ket koulskoude. En un taol avat ez advelas dirazañ ar c'harr-se, ur sul da noz, e rodou en avel e-kreiz an hent, en e gichen daou veleg, unan anezho daoulinet war ar wrimenn, e stol en-dro d'e c'houzoug ha daou archer un tammig pelloc'h e-tal o motoioù o c'hortoz, hag ar parkeier noazh, sioul ha didud tro-dro.

Ur maen dibradet gant ur rod a stokas kreñv dindan ar c'harr hag a zassonas o spontañ anezhañ.

Gallout a rafe echuiñ diouzhtu moarvat war an hent-se. Ar moarvat en lakae da dermal, ha, marteze, n'en doa tamm c'hoant ebet da echuiñ.

Ronan HUON, An irin glas, 1966.

Va mamm-gozh a oa ur vaouezig strizh ha treut-ki, met daoust da se ken nerzhus hag un aneval, ha buhez emni evel n'hoc'h eus ket gwelet biskoazh; eviti da vezañ o loeniñ a-hed an deiz, marse ne zeue liv ar skuizh warni. Abaoe ma'm eus koun, pa oanur bugelig o ruzata war e barlochoù dre an ti, gwenn-kann e oa he fennad blev. Gwall hir e kaven-me he fri sparfell, ha bez' e oa en he fenn daoulagad damc'hlas evel pa vijent bet dislivet dre skuilh daeroù, rak, diwar an disterañ digarez hag alies hep tanfoeltr abeg ebet, e stage da leñvañ druz. Plijout a rae dezhi moarvat ober ur wech an amzer ur c'hofad gouelañ, ha Biz Kamm, daoust ma veze peurliesañ ken dibreder hag ur vi nevez dozvet, a lavare neuze, ur sac'had droug emañ: "Va Doue ivez 'ta gant houmañ! krog eo adarre merc'h Sapeur da zougen kañv d'he bramm kentañ!" Met gwellañ tra oa, ken prim all, e torre d'he glac'h-ar. Goude ma oa Soaz Sapeur kalon vat holl, graet e veze evel-kent anezhi ur plac'h feuls, ha zoken gouez a-walc'h, da vihanañ ouzh ar re na'ouient ket ober diouti. War a lavar an holl endro din, tennañ a ran dezhi e-keñver meur a dech; a c'hell bezañ, hogen ne gred ket din e vefen ken kalon vat ha hi, na pell ac'hane!

Jarl PRIEL, Va zammig buhez 1954.

Ya, gwir o doa lavaret ar gouerion pa anzavent na vefe ket mui chomet gwall bell Riwanon en o bro.

Antronoz vintin, an arzour a oa ast kuit. Ne c'hallas ket padout hiroc'h en Ilvern, gant ar c'hloc'h o tintal e kañv, en draonienn. D'ar gêrbenn e tistroas, mantret ha gloazet.

Ne c'hallo biken livañ poltred ar Gened.

E vignoned ouzh e welout a voe laouen-bras. Riwanon avat, ne oa en e galon nemet melkoni ha hirnez.

Devezhioù a dremenas hag an arzourion a glaskas gouzout petra oa deuet adarre o mignon da vezañ. Ne veze gwelet e nep lec'h, nag en ostalerioù war an deiz, nag, en noz, er c'hoarioù pe er festoù darempredet. Riwanon en doa prenet dor e di, hag e laboure hep astal; ha pa zeue unan bennak da c'houlenn digor, ne veze respont ebet.

Ar vuhez a darzhas war al lien e daoulagad hiraezhus gwerc'hez ar Run-Heol.

Ne ziskouezas Riwanon ar poltred-se da zen, na zoken d'e vrasañ mignoned. Bemdez avat, e selle outañ, pe gwelloc'h, e selle outi, rak e gwirionez e oa Levenez hec'h-unan adsavet d'ar vuhez.

Adalek neuze e teuas Riwanon da vezañ laouen. Fa c'houlenne, avat, e vignoned digantañ perak ne live mui e tarzhe ur mouse'hoarzh trist war e vuzelloù ha ne responte ket.

Jakez RIOU, Ar Run-Heol 1934.

Ya! Ya! gwelout a ran; ho tiskleriadurioù zo ivez gwenn ha du ha n'oc'h ket souezhet eo bet diskaret ar monumant gant kement a dud e kement korn eus kêr. ( Ur pennad. Dezhañ e-unan ) Taol Gwenn ha Du zo bet graet en noz, pe, da nebeutañ, a-raok an deiz. N'int ket avat paotred dispont ha dont a rin a-benn da graouiañ war un dro an du hag ar gwenn. Gwenn ha Du... Gwenn ha Du zo da gavout. ( D'ar polis ) Chomit un hanter ac'h-anoc'h war ar blasenn, da ziwall ar monumant, ken kaz ma vefe laeret un tamm anezhañ; an hanter all a stanko an hentoù a zegas da Roazhon. Klevit: ur muntret a zistro alies da dach-

enn e dorfed, keuz ennañ pe fougé. Taolit evezh enta! An hini kentañ a dostay ouzh ar monumant bruzhmet, lakait dezhañ an ereoù; an neb a dremeno e-biou dezhañ en ur c'hoarzhin pe zoken gant ur mousc'hoarzh, an ereoù dezhañ; d'an neb a glasko kuitaat Roazhon, pres warnañ, an ereoù; d'an neb a droy kein ouzh ho kwelout, an ereoù; d'an neb a dremeno, stouet e benn, an ereoù. Ereoù, ereoù! gant ma vo ereet an torfedour gwir! Rak Gwenn ha Du zo da gavout. Klevout a rit? Ahe! prim ac'han ha pep hini en e blas, ha degasit din ur gwenn pe un du. An hini a ray kazeg en e dro en devo keuz moarvat. ( Ar polis en em denn ) Pa soñjan e paro bremaik an heol war blasenn an tikêr... Ha pa soñjan e paro an heol-se e lec'h all ivez... ( Sellout a ra ouzh an deiziadur a verk 7 eost 1932. Diframmañ a ra ar bajenn, ouzh he zortilhañ, en ur waskañ war e imor ) Seizh... a... viz eost... mil... nav c'hant... daou... ha... tregont...

Jakez RIOU, Dogan 1943.

54.

ISTOR HA YOUL AN DEN

An Istor ne sent ket ouzh youl an den, met youl an den en deus perzh en daelerezh ma tisoc'h an Istor dioutañ. Ar youl wellañ avat a-fet daelerezh n'eo ket ar youl-ren pe -berc'hennañ, met ar youl-drehontañ. Trec'hioù an den zo bepred trec'hioù ar wirionez, trec'hioù ar spered. An trec'hioù-se avat n'eus ket dibadeloc'h egeto. Ne ensavont nepred ren ar wirionez, na ren ar spered er bed; drezo ned eo an den nepred mestr ar spered na perc'henn ar wirionez. Pep trec'h eus ar spered a ziazez ur savelema nevez, a chom warni furm ar spered, met a ya, kerkent ha diazezet, ken amspered ha peurrest an natur: lezennoù ar Stad disoc'het diouzh an dispac'h a vez lezennoù

int, ha destrizhus evel pep lezenn. Diwallet enta an dispac'her diouzh pep uhelegezh ha pep mesiazelezh. Nepred ne zigor riboul strizh an Istor war Baradoz an Douar da heul nap dispac'h.

EMSAV 40/117 1970.

55.

EMDROADUR AR BREZHONEG

Arveret eo bet ar reizhskrivadur hag ar yezhadurevel arstern ret evit diorren ar yezh e pep keñver. Adwellet eo bet an troioù-lavar rannyezhel, ar gerioù poblek, an testennoù kozh, evit pinvidikaat gallusteroù ar brezhoneg ha krouiñ ur yezh lennegel ledan ha liesdoare. Ar reizhskrivadur en deus aotreet an araokadennoù souezhus a zo deuet goude e studi ar yezh, ha se evit un abeg aes-kenan da gompren: ur wezh tennet digant ar skrivagnerion pep aotre da emellout e skrivadur ar gerioù eo bet ret dezho ober traoù kalz uheloc'h, peurgetket sevel skridoù, pe chom dilabour. Al labour amañ zo bet enta pinvidikaat ar yezh e pep keñver en ur vont d'ar skridoù kozh, d'an testennoù damankounac'haet, d'an dud a bep renkad er gevredigezh vrezhon.

Hogen n'eus bet tu da frammañ ar yezh evel-se ha d'he diorren nemet peogwir e oa bet dibabet ur pal: ober eus ar brezhoneg benveg meizañ ha diorren ar vro a-bezh, advrezhonekaat enta ar gevredigezh e Breizh penn-da-benn. Ar pal-se endeeun en deus dibradet ar brezhoneg diouzh geunioù ar rannvroel-erezh hag an trefodachoù.

G. DUBOURG, Tonkad 66.

56

LEVEZON AR SEVENADURIOU WAR UR VRO

En hevelep doare m'hon eus ezhomm evit traoù an ene eus

skoazell an Denezh a-bezh, evit traoù ar spered hon eus ezhomm eus ar Bed holl. Ul lezenn a "gemer" hag a "ro" a stag kenetrezo holl bobloù ar bed. Hag o teurel ur sell ouzh an istor, e welomp n'en deus biskoazh sevenadur ebet kresket hep skor ar sevenadurioù all. Amprestet o deus ar C'hresianed digant henbobloù Azia, ar Romaned digant ar C'hresianed, hag ar Gelted kozh o-unan digant ar bobloù tost dezho. Hag en amzerioù bremañ, n'o deus ket paouezet pobloù Europa, bras ha bihan, da sunañ magadur-spered an eil digant eben, pe digant pobloù all an douar. Buhez ur bobl eo kement-se. Hag e c'haller lavarout: hep amprest digant an estren, nep gwir vuhez vroadel.

Mar bije chomet Breizh digabestr, hevelep kont a vije bet ganti. E-lec'h bezañ mouget gant sevenadur Bro-C'hall, he dije tañvaet un tamm eus holl sevenadurioù ar Bed, o c'hounit bemdez pinvidigezhioù nevez, hep koll tamm ebet eus he broadelezh. Evel Danmark pe Holland, da skouer, awenet e vije bet tro-ha-tro gant broioù an Hanternoz, ar C'hornog, ar Reter, ar C'hreisteiz. Lev-ezon Bro-C'hall neuze a vije bet madelezhuz, peogwir ne vije ket bet re vras: pinvidikaat he dije graet hon sevenadur-ni, e-lec'h e zistrujañ. Bet e vije evitañ evel evit ur blantenn an heol hag ar glav. Bremañ avat, eo Breizh, evel ur blantenn losket gant an heol ha breinet gant ar glav.

Roparz HEMON, Breizh hag ar Bed 1925.

57. EMGANN HA TREC'H PEREDUR

- Da c'houlenn 'm eus, eme Peredur, diganit, ober reiñ din marc'h hag armoù da vont da welout ar c'hatailh, war va ger da sistreiñ e prizon war va c'hiz.

- Ent laouen, emezi, me a roy dit kaout marc'h hag armoù.

Ha hi a roas dezhañ marc'h hag armoù hag ur vantell beur-

ruz war c'horre e armoù hag un tarian melen war e skoaz.

Ha dont d'ar c'hatailh a reas. Ha neb a em gavas gantañ eus a dud ar c'hont en deiz-se, eñ o diskaras holl el leur. Hag eñ a zeuas war e giz d'e brizon.

Goulenn keloù a reas-hi digant Peredur ha ne lavaras eñ ur ger outi.

Ha hi a yeas da c'houlenn keloù digant he zad. Ha goulenn a reas piv a oa bet ar gwellañ eus ar c'hoskor.

Eñ a lavaras n'en anevez ket.

- Ur gour oa, hag ur vantell ruz war benn e armoù, hag un tarian melen war e skoaz.

Ha mousc'hoarzhin a reas-hi, ha dont e-lec'h e oa Peredur.

Ha resped kaer a voe evitañ an noz-se.

Peredur

( tr.br. J. Le ROUX 1923 )

58. C'HWITADENN AL LENNEGEZH-POBL E DEROU AN UGENTVET KANTVED

Ur fazi bras o deus graet, - kentañ penn-abeg, a gredan, da bacurentez hon lennegezh. Klasket o deus sevel ul lennegezh e-lec'h ne oa lennegezh ebet da sevel. Ha c'hwitet o deus war o zaol.

Komz ouzh ar bobl, deskiñ ar bobl, uhelaat soñjoù ar bobl, treiñ ar bobl tamm-ha-tamm ouzh traoù ar spered, setu petra oa o mennoz. Diazezañ war ar bobl amzer-da-zont Breizh o vezañ na oa nemet ar bobl he doa miret un tamm eus he c'heltel-ezh.

Ha setu perak hon eus gwelet o sevel e Breizh ul lennegezh tost a-walc'h ouzh al lennegezh-pobl, hag un tammig disheñvel koulskoude: barzhonegoù, a oa hanter varzhonegoù ha hanter sonioù-pobl; marvailhoù, hanter diwar skouer marvailhoù skriv-

agnerion Bro-C'hall ha hanter diwar skouer marvailhoù-pobl Breizh; holl, skrivet en ur yezh, hanter drefoedach ha hanter yezh lennek; ur c'hemmesk iskis, en ur ger, eus daou zanvez ha daou spered.

Douget etre daou c'hoant,- ar c'hoant bezañ komprenet gant ar bobl, hag ar c'hoant bezañ heuliet gant an dud desket,- n'eo deus ket gwelet hon skrivagnerion pebezh labour diaes-spontus, hogos dic'hallus, o doa boulc'het. Stourmet o deus gredus ha kalonek e-pad bloavezhioù, ha, koulz lavaret, en aner. An darn vuiañ eus al levrioù brezhonek,- ar re embannet, dreist-holl, e derou ar c'hantved-mañ,- zo bremañ ankounac'haet. Ne vezont ket lennet gant ar bobl, na gav ket plijadur enno. Hag evit an dud desket, n'eo ket ar seurt skridoù a c'hell magañ o spered.

Roparz HEMON, Lennegezh 1923.

JEZUZ DIRAK PILAT

Neuze e tistroas Pilat e diabarzh ar pretordi; gervel a reas Jezuz hag e lavaras dezhañ: "Ha te eo Roue ar Yuzevion?" Respont a reas Jezuz: "Hag ac'hanout da-unan e lavarez se, pe reoù all o deus henn lavaret dit diwar va fenn?" - "Daoust ha Yuzev on-me? a respontas Pilat. Da bobl hag an Arc'hveleion o deus da lakaet etre va daouarn. Petra 'c'h eus graet?" Ha Jezuz da respont: "Va Rouantelezh n'eo ket eus ar bed-mañ. Mar bije va rouantelezh eus ar bed-mañ, o dije stourmet va servijerion evit mirout na ven lakaet etre daouarn ar Yuzevion; hogen va rouantelezh n'eo ket ac'han." Neuze e lavaras Pilat dezhañ: "Roue out enta?" - "Evel ma lavarez, a respontas Jezuz, roue on. Evit kement-se ez on bet ganet, hag evit kement-se ez on deuet er bed, evit reiñ testeni d'ar wirionez. An

neb a zo mab ar wirionez a selaou va mouezh." Pilat a lavaras dezhañ: "Petra eo ar wirionez?"

An Aviel hervez Sant Yann 18, 33-38.  
( tr.br: Maodez GLANNDOUR 1969 )

EMVOD ER MAERDI

Un engroez a oa e gwirionez er sal vras. Lamet oa bet ar speurennoù. Ne felle da zen dioueriñ an arvest. Klask a ris stardañ un nebeut dornioù evit mirout un emzalc'h dereat, hogen dornioù 'zo a hañvale bezañ peget e strad ar godelloù, aon tap-out lorgnez digenin moarvat. A! Ar c'horonal Kabell-Touseg eus Koad ar Bleunioù, bepred gentleman.

- Noz vat, Aotrou Maer.
- Noz vat, Aotrou Kadriadiad.

Pilpouz ac'hanout!

- Neuze, Aotrou Maer, mont a reomp? Nav eur ha kard eo.
- Aotrou Kadriadiad, deoc'h eo. Fenez n'on nemet un arvester evel ar re all.

En em gavout a ris adarre e kador-vrec'h an Aotrou Maer, gant ur skolaer prevez en daou du.

Tevel a reas an dud, sellout ouzhimp ha digeriñ o divskouarn brasañ ma c'hallent. Arabat oa dezho koll an disterañ ger, n'eus ket c'hoariva bemnoz e Gwenvenez hag evit ur bennozh Doue ouzhpenn. Ober a ris van da basaat, amzer din da gavout ar c'homzoù a zeree evit kregiñ: evel-se e vez graet gant an dud a-zoare. Diaes eo bezañ en ho pleud gant daou c'hant daoulegad paret warnoc'h pa ouzoc'h ez eus en o zouez tud memmet da dangwallañ ti ur c'heneil, kilhevardonerion ha kigerion youlet d'ho tistlipañ, ha gouyriaded darev da gavout abeg e pep ger lavaret a-dreuz ha da stigmañ un trap war ho hent. Stagañ a ris gant un nebeut lavaredoù seven evit trugarekaat an dud da vezañ deuet

ken niverus,- pilpous ac'hanon ivez ar wech-mañ,- ha goustadik, o kemer va anal, e tisplegis peragoù ha penaozioù an darvoudoù c'hoarvezet e-kerz ar sizhun. An dud a selaoue evel pa vije bet un oferenn, hogen a-dreñv talioù 'zo ne veze ket dibunet pedenn-où. O koll tamm-ha-tamm eus va lentegzh ez is betek penn va frezeg.

Yann MIKAEL, Ur sizhunvezh dispac'h  
1970.

61. AN DOUARIDIGEZH

Ne zisplegin ket amañ kement sotoni a glevis da zeiz an douaridigezh. Glac'haret-holl e oan, ha va glac'har a'm douge da varn garv an dud a oa eno. Biskoazh n'on bet evit gouzañv ar re a heuilh un ambroug-kañv o kaozeal, o varvailhat, o fars-al zoken hep tamm dereadegezh e-keñver an hini marv. En deiz-se e voen kommaret betek mont hogos er-maez ac'hanon va-unan. An dud a hiboude etrezo, a labeze, a gonte a bep seurt traoù mezhus a-zivout va c'hencil paour. Unan a zeuas da'm c'havout evel-se a drois kein dezhañ, ha ne'm eus morse e saludet abaoe. An holl gasoni dastumet e-doug bloavezhioù gant ar gevredigezh a-enep un den en doa mennet bevañ un tammig a-gostez,- evel m'en doa ar gwir,- a darzhe trumm, e-giz ur mor a vreinadur, war e arched. Hañvalout a rae din e oa aze, n'eo ket tud, hogen ur bagad touseged flaerius.

Unan hepken a ziskoueze kacut un tammig keuz: an dimezell Loeiza. Ne oa den e kañv nemeti: Emil n'en doa kar ebet. War a glevis, digant div vaouez a gomze uhel er vered, testamantet en doa dezhi e holl zanvez: e holl arc'hant hag e di.

Roparz HEMON, Al laer avel

62.

ER MERZHER-SALAUN

55

O tegouezhout er vourc'h dre unan eus an hentoùigoù marellet gant kroazioù ha kalvarioù, kentañ a verzer eo ar renkennad tiez izel savet e lefan war ribl ur c'hozh hent-tro pavezet gant greun-vaen. Hemañ, diginkl, zo a-us dezhañ ur c'halvar gotek: emañ ar C'hrist, seder, etre an daou laer gliziennet en un doare euzhus.

Aet e-biou d'ar volz-enor e tifourk ar gweladenn dirak ar porched; stouet eo hemañ war-du ar sav-heol: paour kaezh kozhiad, an hini hemañ eus Bro-Leon! Soñjit ervat!

War ur banell greiz, ur Werc'hez gourvezet, moarvat poltred un itron a uhelrenk, zo muturniet. A bep tu d'ar porched, eus an traoù d'an nec'h, ur vordilh a dudennotigoù: kizellet brav int, hogen gant an avel, ar glav ha dorn fallakr ar vandaled ez eus bet mekaet ul lod anezho. Dilerc'hiadoù liv, strewet amañ hag ahont, a ro dimp da soñjal na pegen pinvidik e tlee bezañ kinkladur ar porched. War ar peulioù e vez gwelet skeudennadurioù eus ar Bibl. An Tri Roue oc'h azeuliñ ar Mabig Jezuz, ar vugulion oc'h eveshaat an deñved, ar Werc'hez e ti Elesbed, Jezuz dirak an Doktored, hag all..., an holl arvestoù-se gwitibunan, lakaet buhez enno gant un engroez a aeled hag aeledigoù, o leuniañ an holl lec'hioù didud. Dre-holl emaint, o tiskenn eus an neñvoù da gemenn ar C'heloù-Mat d'ar vesaerion o tougen skoedoù pe levrioù e-tal gwele Mari nevez willoudet.

Nannig AR MEB-CHEREL, Ar Merzher 1970.

63.

NUNTR EN OSTALERI "AN DUGED"

"Dec'h da noz, e-tro un eur beure, ur mevel-kambr, an Ao. Gwilherm eus ostalери an Duged, o tiskenn diwar ar saverez er c'hwec'hvet solieradur, a glevas daou daol pistolenn, war-du

reter an ti. Redek a reas betek penn pellañ an trepas, lec'h ma oa un nebeut kambrou feurmet war a ouie. O klask petra oa c'hoarvezet, e tigoras da gentañ teir c'hambr hag o c'havas goullo. Dor ar pedervet a oa damzigor ha ne oa den ebet enni kennebeut. O vont e-barzh ar pempet avat, an hini bellañ en trepas, e wellas ur c'horf astennet war ar pallenn-leur e-tal ar prenestr digor-bras. En e sav e-kichen ar c'horf edo ur gwaz, ur bistolenn en e zorn. Darev da stourm evit pakañ krog en arm, an Ao. Gwilherm, dizamant d'an argoll, a lammis gant ar brasañ kalon war an den, hogen ne gavas harz ebet. Ar gwaz, stumm dezhañ da vezañ abafet gant e walldaol, a lezas an Ao. Gwilherm da dennañ e bistolenn digentañ. Neuze an Ao. Gwilherm o kemer an den e kouch, a bellgomzas d'ar merour, ha, dizale, ar bolis a zegouezhe war al lec'h. Diwar desteni an Ao. Gwilherm n'eus mar ebet: tapet en deus ar muntret dres goude e walldaol. Hon gwellañ gourc'hemenoù dezhañ."

- "Da biv? D'ar muntret evit doare. Gwashañ brezhoneg zo gant patred ar c'helaouennoù", eme Yun, hag e talc'has da lenn.

Yann-Vari KERWERC'HEZ, En ur rambreal.  
1943.

#### PARADOZ AN NATUR C'HLAS

Dre eurvad on bet ganet en ur c'horn-led na oa ket aloubet c'hoazh gant ar greanterezh. E-se e'm eus anavezet an Natur evel m'o doa hec'h anavezet an dud e-pad c'hwec'h mil bloaz, abaoe ar Reverzhi C'hounezel. Ar chadennad lanneier o wiskañ rozioù kreisteiz an draonienn m'emañ bourc'h Sant-Karreug, hag ar c'hoad war an uhelennoù he gwarez en norz zo bet din - zo din bepred - an nor war c'hwec'h milved eus istor ar bed. Eno e'm eus kejet da vat gant Vergilius tri bloaz goude pleustradennoù droch ar c'helenndi; ha gant Shelley, ha gant Hölderlin<sup>he</sup>

Rimbaud. War ur gwelead belc'hoù er bineg teñval e'm eus lennet An Ifern; gant lamponed all e oan en em silet er maner ha betek al levraoueg, ma'm boa skrapet oberoù Dante. Penaos buhezañ Kanenn ar C'hanennoù anez bezañ kantreet stre al lierzhoù bleuñvek ha frouezhek en abardaevezhioù an dibenn hañv? Hep mar. Saul ha David oc'h argadiñ ar Filistined, Leonidas en Thermopulai oa heñveloc'h ouzhimp pa vrezeliemp goude ar foenn en daou du da stêr Urn, eget ouzh an nijer amerikan a bulluc'has Hiroshima. Paradoz an Natur c'hlas zo din gwengel ha gwengoun, keloù eürus ha koun eürus war un dro. Enni emañ va zad-kozh ha va mamm-gozh evel daou arc'houere mut ha mat.

ABANNA, Ar paradozioù kollet 1970.

65.

#### YUN O PREDERIAÑ

Klask a reas prederiañ a-zevri-bev evit ur wech en e vuhez. Atav e veze ul labour spontus evitañ prederiañ. Ne c'halle ket lakaat teir ratozh stag-ouzh-stag. Da goll ez ae atav e soñj etouez eñvorennoù kozh pe goshoc'h, randonennoù dibal diwar-benn an amzer-vremañ, ha rambreoù diresis a-zivout an hini da zont. E-kreiz an turubailhoù didalvoud-se en em sile drailhennoù kanacouennoù farsus pe drist, pezhiaoù sonerezh uhel pe skañv, mentadoù distag pe a-stroll diwar donioù liesdoare. E brederiadennoù a oa evel toennoù tiez ha kernioù gwez o sevel a-us d'ur gwiskad lusenn serr-noz e strad un draonienn leun a zassonoù hud. Ne oa nemet dre strivañ e c'halle Yun beajiñ en e spered a doennoù da gernoù hag a wez da diez, hep sankañ na beuziñ el latar, na bezañ diheñchet dre selaou ouzh bed kevrinus ar sonioù.

Yann-Vari KERWERC'HEZ, En ur rambreal  
1943.

Binvioù gall int en hon bro. Hogen ar binvioù-se zo ivez frammoù dizalc'h a-walc'h diouzh levrierezh ar Stad c'hall. Da heul, bep ma sankont e Breizh, bep ma kresk o izili e Breizh, e tennont da vezañ ivez binvioù etre daouarn Breizhiz. Dre ober berzh e Breizh e teuont da vezañ maeziennoù d'un emdarzhegezh vrezhon techet da zisteurel ar vestroni barizian; pennañ arbenn an tech-se zo da glask da gentañ en digevatalded diorreadur armerzhel etre Breizh ha Paris moarvat; un arbenn all da lakaat e penn-kont eo an emskiant-vro o c'horrer lentik e poblañs Vreizh. E-se ez eo ar c'hveluniadoù un dachenn-labour evit an Emsav. N'eo ket e ve da c'hortoz diganto un emdroadur war-du frammoù emsavel. Hogen ar roll pouezus a c'hellont c'hoari eo an hini a zo bet termenet e meur a lec'h evel roll al ledemsav. O emdarzhegezh, lezet en he stad krai, ne oufe bezañ nemet an hual a gev ar frammoù arnevez en ur rannvro henvoazel; hogen, enfurmet gant kealiad an Emsav e c'hell an emdarzhegezh-se mont d'ul lec'h-treluskañ evit an emskiant vroadel ha war un dro d'un nerzh-gourzhtreñ ledemsavel.

EMSAV 48/383 1970.

67. DAOU ZARVOUD

Karout a rafen keñveriañ daou zarvoud c'hoarvezet e Breizh: tarzhadenn vonumant Roazhon, tagadenn isprefeti Montroulez... Tarzhadenn Roazhon a voe evit an holl evel ur frazenn distaget fraezh en ur "yezh" anavezet mat, eviti da vezañ bet diglevet abaoe pell. Hag an holl a vezas fraezh ar ster anezhi, ar c'hallaoued gent sebez ha konnar, ar Vrezhoned gant ur bomm a lorc'h hag a levenez na gomprenent ket re. Enno e kroge da fiñval

evel un eñvor don na ouient ket e oa anezhañ. Hag ar baotred a reas an taol a oa ivez dres oc'h adkavout ur "yezh" kozh na ouient ket moarvat en hec'h anavezet kea mat. Tagadenn is-prefeti Montroulez en enep, a chomas dispis ha forc'hellek ar ster anezhi. An emskiant vrezhon a glasse anavezout warni un dremm donkadek vrezhon. hep dont a-benn. Mar boe tarzhadenn Roazhon ur frazenn fraezh, e chomas tagadenn Montroulez ur valbouzadenn dispis. Ar c'hallaoued diouzh o zu, a glaskas lakaat war daol Montroulez liv un darvoud kevredigezhel gall, hag e teujont a-benn betek ur poent; hogen evito e oa ur valbouzadenn gevredigezhel ivez: tra aes e voe dezho ober goap anezhi; ha koulskoude e vanjont nerverennek en abeg d'an taol-mouezh brezhon a dregerne ganti.

Gi ETIENNE, Tonkad 66.

EMSAV HA SOKIALOURIEZH

Diouzh e du, emañ an Emsav o paouez "tarzhañ ar c'hombod broadel". Pell war e lerc'h emañ bremañ an eil Emsav hag e nac'hadur d'ober gudenn gant ar gevredadelezn hag ar sokialouriezh. En anv ar frankiz, tud an eil Emsav a leze gant pobl Vreizh "ur wech dieubet" an diviz war ar renad politikel frankizour pe sokialour a zerefe outi. Ne welent ket an dislavar a oa en o c'hinnig: an emzalc'h frankizour a ziskouezent ouzh e ober oa endeo un dibab eus ar frankizouriezh. O fazi oa ober eus an enebadur kevalouriezh/sokialouriezh un enebadur etre renadoù riezal, da lavarout eo ur gudenn evit an dazont, ha n'eo ket un enebadur etre divezouriezhoù, da lavarout eo ur gudenn evit ar bremañ. Emañ an Emsav o hontkenderc'hañ ur c'healiad kevredadel e "kerentiezh" gant meur a geal sokialour. Ha kement-se a c'hell ober zoken ma ne chom emsav sokialour

ebet hiziv an deiz.

EMSAV 41/152 1970.

69. LEZARDREV

Pa oan bugel, e oa evidon bepred ur blijadur nevez mont war droad, meur a wech ar bloaz, eus Pempoull da Lezardrev. Goude kimiadiñ diouzh ar gêr c'hendik a-ziwar grav Pennkrec'h, alese hoc'h eus spi war kêr a-bezh ha war ar plegmor en e led, e kerzhemp e-pad un hanter-eur evit adkavout, e chapel Kergrist hag a-ziwar ar pont-orjal, gwelvaou nevez dispar. Eus Kergrist e welad bourc'h Lezardrev, tamolodet e pleg ar stêr, hag e klaskemp, e-touez tropell an toennoù, an hini m'edomp o vont. Hag a-ziwar ar pont! neuze e oa c'hoazh ar pont kozh e leurenn goad, kalz mistroc'h gant e bevar filer maen, eget ar pont nevez metalek holl a zo bet savet da reiñ tremen d'an hent-houarn. Ac'halese, mard eo sac'het ar sell diouzh tu an hanternoz gant ar vourc'h war he beg-douar, a skoach an aber, ez eus diouzh ar c'hreisteiz digor ec'hon al ledanoù, e-lec'h ma red dourioù ar stêr da vare ar gourlanv en ul lennad sioul a vohera, ouzhpenn 1 500 metr treuz dezhañ, bevennet en Traoñ gant uhelennoù koadek Lanserv e Flourivou; aze, er c'hoadoù pin-se, eo e voe trec'het, flastret ha distrujet an armeadoù Northmen deut da breizhata en hon bro, ha stlapet, beuzet e Toull ar C'hwiled gant brec'h dir hon Dug mat Alan Barvek.

KERVERZHIOU.

70. SEVENADUR E BREIZH

Sellomp ouzh hon bro. Pelec'h emañ ar sevenadur? Ur seven-

61

adur, er ster gwan, zo anat diouzhtu: ar sevenadur gall. Er ster gwan, emezomp, rak n'eo ket hon pobl en krouas, n'eo ket ennomp emañ an endoniad bev anezhañ, n'eo ket ni ar vicherourion war ar stern anezhañ. Madoù-beveziñ enporzhiet n'eo ken ar sevenadur gall e Breizh. E yezh an armerzh, e lavarimp n'eo ket ar seveniñ brezhon abaoe kantvedoù evit bastañ d'an ezhommoù: un dienez vras a sevenerion a ren en hon bro; ken ma rank hon pobl bevañ diwar enporzhiadurioù sevenadurel estren. An enporzhiadurioù avat a ranker bepred paeañ: pa na c'haller ket reiñ enporzhiadurioù en eskemm, e ranker en em reiñ an unan; perc'hennet eo bet Breizh gant an estrenion a vaste dezhi frouezh o sevenadur; aze emañ ster ar milved diwezhañ eus hon Istor. Souezh ebet e ve meizet, ha gant Breizhiz o-unan, evel treuzgeot e park ar sevenadur gall ar pezh a chom eus ar stuzegezh vrezhon henvoazel. Piv e Breizh a harzas ouzh daouarn ar c'hwennerion, a viras ouzh embregerezh ar "Simbol" a beurober e gefridi? Da dud diwriziennet eo gwelloc'h c'hoazh ur sevenadur er ster gwan eget sevenadur ebet.

EMSAV 6/131 1967.

71.

PENAOZ SAVETIÑ AR BREZHONEG KUIT A BOLITIKEREZH

An holl a oar ez eus er c'hêrioù bras kalz itronezed kozh o deus poan o yale. Alies o deus an itronezed-se chas brav-kenan na c'houlennont ket gwelloc'h eget ober ur valeadenn bemdez. Ar vrezhonegerion a c'hallfe neuze en em ginnig evit mont da bourmen chas an itronezed kozh. Marteze na vefe ket ret diskouez en derou e komzer brezhonég gant aon da spontañ an itronezed a c'hallfe krediñ emeur o klask deskiñ d'o loened feal yezh varbar S.A.D.E.D.. Forzh penaos, ar gudenn n'emañ ket aze. Ur wech krog pep brezhoneger e chadenn e gi, e c'hallfe an holl

en em vodañ war ur blasenn dibabet en a-raok e-kreiz kêr hag eno kregiñ da gomz brezhoneg kenetrezo. Goude e treuzfent ar straedoù, atav a-gevret, pezh o lakfe da gemer perzh en un doare-dic'h-ortoz e buhez ar geoded: mar bafent pennek a-walc'h e teufent sur-mat da lakaat an dud tro-dro dezho da zoujañ d'ar brezhoneg, gant ma ne harzhfe ket re ar chas evelato... Moarvat e vefe kavet ivez nevezvrezhonegerion en o zouez, setu perak e vefe mat adarre derc'hel na harzhfe re ar chas: ar re a zo o paouez deskiñ ar yezh o devez poan alies o kompren ar c'hemmadurioù boas ha ne vefe ket dav ouzhpenn o c'hemmeskañ gant harzhadennoù loened ferv.

BELISANA 1965.

AL LIAMM EMSAVEL

Al liamm etre izili hon strollad n'eo ket ul liamm a vignoniezh. Evit an abeg n'eo ket hiniennel, ha pa na c'hell ket padout pelloc'h eget gwirionded an dud. E gwir, hevelep liamm n'eo ket disheñvel diouzh ar framm. Ar framm eo. Pa ra unan eo c'hanomp pemp kilometr war droad en erc'h da c'hwec'h eur diouzh ar mintin evit dont d'un emvod labour ma n'eus d'ober netra a gement n'en dije gortozet pemzek devezh, e c'haller lavarout e sent, evel ma sent ar soudarded. Koulskoude n'eo ket a-walc'h lavarout se. Gouzout a oar ez eo mont d'an emvod evel reiñ anal d'ar gumuniezh, evel ul lamm gwad er framm bev anezhi. Gouzout a oar ivez ez eo al liammoù kumuniezhel breskañ tra er bed, hag e tleer kemerout ar brasañ preder d'o derc'hel bev. Rak eno emañ ar warantiz ma vo ar Stad a savimp tra denel, ha n'eo ket ardivink a waskerezh.

DANEVELLOU S.A.D.E.D. 1964.

LABOUR KEFRIDIADDEL HA LABOUR POLITIKEL

Diaezet e vez a-wechoù an izili pa na c'haller ket muzuliañ bremañ gant sifroù an disoc'hoù eus al labour renet gant E.S.B.. Lavaret ez eus bet da skouer: "E derou S.A.D.E.D. e veze fetis an disoc'hoù: niver ar skolidi o kreskiñ, rummadoù nevez o vezañ savet, izili nevez o tont". Hogen n'eo ket ar c'hresk eus niver an izili, ar rummadoù pe ar gefridiaded en deus lakaet S.A.D.E.D. da emdreiñ hag E.S.B. da vezañ savet. N'eo ket al labour standur e diabarzh S.A.D.E.D. en deus lakaet ar framm politikel da ziorren, daoust ma ne vije ket bet eus ar framm politikel hep an dek bloavezhiañ a labour standur diastal e diabarzh ar framm kefridiadel. Diwar an derou avat, e-kichen an ober kefridiadel e rene ur preder politikel; tamm-ha-tamm en deus ar preder politikel-se en em fetisaet d'e dro en un ober politikel, standur evit un darn, dreiststandur evit an darn vrasañ. Diwarnañ eo bet diorroet ar framm politikel. Diaesoc'h eo bet da verzout, rak unan eus dibarderioù al labour politikel eo ne c'haller ket e vuzuliañ evel ma reer evit al labour kefridiadel.

Ur skoliad war an Istor en devez un notenn evit pep poelladenn: an notenn-se zo dreist-holl muzul al labour graet, en e gementad hag en e boellegezh. N'eus nemet ar skoliad avat a c'hell lavarout petra en deus lakaet anezhañ e-unan e-barzh e labour, da lavarout eo ar mad en deus tennet anezhañ. Ar pep pouezusañ evit stummadur politikel un den pe emdroadur politikel un emsav zo peurliesañ er-maez eus ar pezh a c'haller muzuliañ gant sifroù war an taol.

Raklun obererazh bloaziek 1971  
Emsav Stadel Breizh.

"Marv oc'h Tristan, pell diouzhin war an douar milliget-mañ, e-lec'h n'ho poa na kar na par. Ha c'hwi o krediñ, marteze, e'm boa ho tilezet. A! pa soñjan er garantez vurzhdus, kreñv ha flour war un dro, a vagemp an eil evit egile!

"Hepdon n'hoc'h eus ket gallet parañ; hepdoc'h, Tristan, ne c'hallan mui bevañ!"

Lemel a reas, hep krenañ, al liñsera guzhe ar c'horf (netra, war a grede, n'en dije mui gallet he lakaat da grenañ!). Hogen pa welas dremm an hini he doa karet, e kemmas liv c'hoazh, - ha hi ken glas dija! - hag e ommas seizet evel pa vije bet taget, hi hec'h-unan, gant krabanoù rust an Ankou.

Nerzh a-walc'h a gavas koulskoude, en he c'harantez, evit en em astenn e-kichen he muiañ karet, he diweuz o klask e ziweuz: "Tristan!" emezi goustadik; hag, en ur vriata ar c'horf divuhez, e huanadas ur wech ouzhpenn: "Tristan!"

Hag, en huanadenn-se, e nijas kuit hec'h ene diouti.

Evel-se e varvas Izold ar rouanez, gant ar boan a waskas he c'halon da heul marv Tristan, he c'heneil.

LANGLEBIZ, Tristan hag Izold 1958.

Pa zeuas er-maez eus ar sal ne oa mui a girri-boutin evit dont en-dro. Un hanter lev en doa da ober war droad. Mat e vefe da guzul-kêr lakaat ur servij-kirri betek kreisnoz, a soñjas, ma c'hallfe an dud distreiñ d'ar gêr goude an abadennoù-noz.

Dre ma kave hir an nozvezh e-unan-penn en ti en doa graet e vennoz mont da welout ur film bennak. Klasket en doa war ar gazetenn. War an trede pajenn, evel boaz, en doa kavet embannoù

ar filmoù a veze diskouezet er sizhun-se hag en doa kemeret ar bus diwezhañ da eizh eur ha kard evit mont d'ar sal-sinema dostañ.

Un istor tasmanoù e oa, dorioù a zigore o-unan pe tud a dremene hep digeriñ hag e vane an dilhad peget ouzh an dorioù evit kouezhañ a-flac'h, en ur bern war al leur.

O tont er-maez en doa graet un ehan er hall hag evel kalz eus ar wazed en doa tanet ur sigaretenn. Ur sigaretenn a gave mat neuze, goude div eurvezh azezet dirak ar skramm, evel m'he c'have mat ivez gwechall goude bezañ bet er mor o neuial, hag evel ma rae kalz a baotred ivez, gouez d'al levrioù, goude ar garantez.

En em silañ a reas neuze e-touez ar mor a dud, an darn vuiañ daou-ha-daou, betek toull an nor, met buan es eas war vihanant ar re a heulie ar memes hent gantañ ha hep dale en em gavas hogos e-unan hediñ ar mogerioù yen. Tremen a reas koubladoù souchet e korn an dorioù. Holl e cant heñvel, peget an eil ouzh egile ha ne c'halle ket gwelout o dremmoù.

Ronan HUON, Kanenn d'al Levenez 1966.

Bale a raen dre vourc'h Ploueneour-Tregh, diarc'hen ha diskabell ar peurliesañ, gant va barv livet e ruz, ha va blev 'ta, va Doue, ur vezh hepken sellout outo, ur sac'h ganin adreuz skoaz hag e'm dorn ur pikol penn bazh, gant ur bragoù pilhaouek hag ur c'hozh kabig e truilhoù en-dro din. Biken ne'm bije kredet en em ziskouez er stad-se e'm bro-Dreger, rak graet e vije ganin al lu, redet o dije ar vugaligoù war va lerc'h hag iset e vije bet zoken ar chas warnon. Du-hont ivez, da vihanañ en devezhoù kentañ, e c'houlenne ar wragez an eil

digant eben: "N'hoc'h eus ket gwelet ar c'hlasker bara-se o vont hag o tont en-dro d'ar presbital? Hennesh moarvat zo o klask peg da laerezh yer pe konikled, pe vioù, ar pezh a c'hall'o pakañ da vountañ en e sac'h." "Ur wech e lavaras ur vaouez da berson ar barrez: "Va Doue, Aotrou Person, pelec'h an diaoul oc'h bet o klask ar Salaun-se? Ma! n'ho piije ket gallet kavout gwelloc'h rak, diouzh e welout, berr-berr e tle bezañ spered ar paour-kaezh!" Met a-benn ur pennadig e vezen degemeret gant Paganiz, n'eo ket evel un estren deuet eus a-bell da c'hoari roll Salaun ar Foll, met evel Salaun ar Follgoad, an hini gwirion, addeuet a varv da vev.

Jarl PRIEL, Amañ hag ahont 1957.

#### 77. AR SANT BEV

Ne oa ket deuet neozh tre ar moerebed gant o sant. Ne oa ket kozh alc'houezet an dorioù dezhe warnañ m'emañ bet ret dezhe o digeriñ en-dro evit an Aotrou Person hag ur baread tud arall o tonet war e lerc'h.

Bec'h a-walc'h zo bet gant Alban evit plomañ war e gravazh hep bout gwelet; bec'h a-walc'h zo bet c'hoazh gantañ kuzhat a-dreñv e gein nemorant e fritadenn vioù. Ned eus ket bet anezhañ goar da naetaat an druzoni diouzh e vizied hag e ziweuz.

Em bakañ a ra neozh bravik brav evel agent war e gravazh. Kaer e oa da welout, e benn gantañ koachet war e skoaz kleiz, e vrec'h dehou savet gantañ d'al laez gant dorn digor.

Brav e vehe bet aet gantañ kenave ha kenave... Kenave da betra? Kenave d'ur bare kelion a zo deuet, a-darvhedad, d'en em dolpañ en-dro dezhañ evit lipat memorantoù Alban.

Ur gromnad anezhe a verv en-dro d'e vizied, ur gromnad arall en-dro d'e ziweuz hag ur gromnad o tarnijal en-dro dezhañ

Nig a reont dezhañ gant o ficherezh ha liperezh, ha seul vui ma nebeuta al lip gante, seul vui e toublont d'ober nig.

Hag ar person, du-hont, ned a ket da du ebet gant e brezeg. War-lerc'h un dra e kav un arall, e buhez ar sant, mat da vout sellet ha kemeret da vout skouer.

Skuizhañ a rae an iliziad o selaou outañ: lod a save, a zaouline; lod a vazailhe hag a skope; ar gwraez, int, a "soube gouloù" hag a voc'he war o brennigennoù.

Ar sant, skuishoc'h eget hini, pa gave gantañ ne veze sell ebet warnañ, a chaboute kelion ouza o spontañ a-bavadoù.

Chabouterezh ha digelionerezh Alban a denn da fall c'hoari dezhañ ha d'ar moerebed. Gwelet eo bet o fichal. Hag ur gwaz bennak da lavarout: "Sellit 'ta, na pezh ul losker gouloù a berson! Ar sant ha razh zo skuizh o selaou outañ. Ne harz ket mui o terc'hel e vrec'h astennet."

Diskenn a ra ar person taeret eus ar gador-brezeg evit donet da welout petra a walle outañ.

Alban, eñ, a gred e teu ar Person a-benn dezhañ, evit e ziandellaat. Diskar a ra diwar e gravazh hag eñ er-maez, dirak an iliziad bezivet, saezhet ha spontet.

Yann-Vari HENNEU, Bouranted an Tierrezh  
(1932)

#### 78. KLASKER KENBD

Liver e oa dre vicher, ha brudet e anv e meur a vro. Steuet en doa poltredoù priñsezed ha rouanezed, hag eus ar broioù estren e teue dezhañ ar vrasañ meuleudi. E poltredoù a oa dreist, a-bell, da re an arzourion vrudetañ, kement a wirionez a lakae enno. Hogen, na brud na meuleudi ne gavas degemer a kalon an arzour. Livet en doa, e gwirionez, poltredoù priñsezed en o c'hened ha rouanezed en o gloar... O sellout outo, avat, goude

ma cent peurach, Rivanon en oa gwe doaniet, rak e daoulagad ar rouezed e lus'he atav pe ar vrazoni pe an hudurniezh pe an teched all. Ne envas morse naturel disi e- gwe e obered. Hag all en doa klasket atav livañ ar wirionez 'Rouez', ar gened monodus hag ar c'hlanded c'hlan...

Neuze, digalonoket, e luitas ar gêrbenn. Dont a reas da gornog e yaouankis, da gastañ da da gavout marteze, war ar maez, ar glaster hag en heol, ur disternañ eus ar vuhez c'hlan en doa klasket betek-henn, e lec'h, en aner.

Rivanon a anevete an dremienn heoliet. Gant gwrez an deiz, e save diouti frendoù ar geot hag ar bleunioù, hag e pep tu e voutkare ar sev nevez a-us d'an douar o strujañ. Saouzanet e chwas, hag al devezh a wiskas e galon a oa burzhud hag estranv.

Jakez RIOU, ar Run-Heol

#### 79. PRYZEGENN SAINT ANTON D'AR PESKED

Ar c'hlaer, ar croudeur, emezañ, ret eo deoc'h, en ho toare  
da l'avez an c'hlaer, ar croudeur, ar croudeur da vezañ bet  
deoc'h an douar ha da dremen ennañ ho puhez. Da zibab  
hozh eus, dour dour pe dour sall. Ne vank deoc'h lec'hioù  
gwasket da d'ar c'hlaer ha wallanzer. Nag eo sklaer an dour!  
Nag a deoc'h eo e-barzh d'ho mazañ! Pa veoc'h lrouet gant an  
Aotrou Doue, e lavaras deoc'h en e vadelezh: kreskit ha bezit  
niverus, hag e roas deoc'h e vennozh. Goude-se, pa voe goloet  
an dour ar-bez gant an dour-bez ha pa varve an holl loened  
all, e lezas ganeoc'h, ha ganeoc'h hepken, ho puhez. Cuzhpenn,  
not en deoc'h brentoù da vont da lec'h ma karit. Dre  
c'houe'hemond Doue, c'hwí eo ho poe an enor da virout ar  
profed heol ha, tri devezh war-lerc'h, d'e zislonkañ, yac'h  
ha saiv, war an aod; c'hwí eo a ginnigas ur pezh arc'hant d'ho

Salver Jezuz Krist, a oa ken paour ma n'en doa ket peadra da  
bacañ an truaioù. Ya, mister souezhus, c'hwí eo a voe magadur-  
ezh Jezuz Krist, ar Roue peurbad, a-raok ha goude ma voe savet  
a varv da vev. Abalamour da gement-se holl, e tleit meuliñ Doue  
en deus bet en ho keñver muoc'h a vadelezh eget e-keñver al  
loened all.

Bleunioù Sant Fransez  
( tr br. Ar Vuhez kristen 1945 )

#### 80. ORIN DIEMPRADUR AR GEVREDIGEZH VREZHON

En daouzekvet kantved ez eus bet graet e Breizh un troc'h  
etre ar vuhez politikel, armerzhel, kefredel hag an eskemmoù  
kevredigezhel boutin. Forzh petore gwikefre, forzh petore  
devouderezh a ve d'an troc'h-se, ez eo pouezus merkañ e voe  
asantet dezhañ gant Brezhoned ar mare-se, ha ne hañval ket  
bezañ bet sellet neuze evel direizh pe arvarus evit tonkad ar  
bobl vrezhon. Dre an troc'h-se e voe diereet kendereoù ar gevredigezh,  
distoket gennadoù an armerzh, diframmet diazez ar  
galloud diouzh an embregerezh anezhañ. Renladoù uhel ar gevredigezh  
vrezhon, o treiñ kein d'ar werin vrezhon, a ziorree ur  
vrizhkevredigezh vrientinel gant renkadoù uhel ar broioù amezek:  
dilezel a rejont ar brezhonag evit al latin, ha goude ar galleg,  
o kas dre-se an disrannoù betek diazezoù donañ ar gedvuhez  
vrezhon. Oc'h ober kement-se en em rene moarvat uhelidi Breizh  
diouzh doareoù o c'henseurtes eus Europa, hogen distrujañ a  
raent en o bro al liammoù o stage ouzh kendereoù all ar bobl  
vrezhon. Setu perak e lavaromp ez eo bet diemprat ar gevredigezh  
e Breizh en daouzekvet kantved.

EMSAV 21/264 1968.

## AR GRAAL SANTEL

Bout o doa ar Vrezhoneg, hervez ma lavarer, ul lestr, ledan un tammig ha sklat, a raent ur per anezhañ, lec'h ma servijent boued d'ar re binvidik pe vrudet a bedent da bredañ ouzh o zaol.

Komz a ra ivez ar barzh Taliesin eus ar per-se, miret pervezh mat ha gant enor, a veze desket gantañ gwerzañ, hag a roe ouzhpenn, d'ar re en enore, ar furnez hag ar galloud da zizoleiñ an dazoned ha kevrinoù kuzhetañ ar bed. Bravaet e oa ar bevennoù anezhañ gant perlez ha mein diaman.

En un neved e veze miret ar per-se, gant un douez enoret gant ar varzhed evel o fatronez.

Kavout a reer ivez ul lestr seurt-se, treset war bezhioù argant kozh Galia. Ouzh ur skudell vetal emañ hañval, hep bev-enn ebet ouzh ar reer anezhi, div skouarn rollet dezhi, ha dreisti un dorn gant ur pleg e kreiz.

Yann-Vari HENEU, Ar Graal santel

## DREMM DISPAC'HEL AR BREZHONEG

Ne c'hell bezañ a vrezhoneg e-maez ur gevredigezh vrezhon, ha ne c'hell bezañ a gevredigezh vrezhon e-maez frammoù politik- el brezhon. Ur skol vrezhoneg a rank bezañ ur benveg da brientiñ an dispac'h a lakay ar frammoù politikel brezhon en o flom hag a ziskaro ar frammoù politikel gall e Breizh. Ur skol vrezhoneg nad eo ket ar benveg dispac'hel-se n'eo ket ur skol, met un touellerezh. Diskouez dispriz ouzh an dud eo o lakaat da zeskiñ brezhoneg en ur guzhat outo an dibab o deus d'ober etre an daou argerzh a zo hiziv o stourmer vro: argerzh an dispac'h, an hini a ren e kevredigezh hag e frammoù an Emsav; argerzh an diskar, an hini a ren er gevredigezh dalc'het gant ar frammoù gall.

Nac'h, evel ma ra skolioù 'zo, lec'hiañ ent politikel ar brezh- oneg zo ober anezhañ un hobi, un albac'henn hiniennel, ur fet- ichenn, boued an dangorelouriezh, ober van d'e zibradañ evit e lazhañ suroc'h a se. Ar gelennerion vrezhoneg a nac'h ober politikerezh a asant derec'hel ar framm gall war ar vro. Ha lec'hiañ ar brezhoneg er framm gall zo tennañ digantañ kuzent galloudezh dispac'hel en deus.

N'eus nemet ul lec'h d'ar brezhoneg: ar framm brezhon. Lec'hiañ ar brezhoneg er framm dispac'hel brezhon zo reiñ d'e c'halloudezhioù dispac'hel an tu leun d'en em ziskouez ha d'en em seveniñ.

EMSAV 27/69-70 1969.

## BLEIMOR

Ul labour savet en deñvalijenn, e-pad ar brezel evit an darn vrasañ, pa n'en doa ket ar barzh a spi da gaout lennerion. Ul labour, n'eo ket evel labourioù hon barzhed, kaset kerkent ha graet prim-ha-prim d'ur gelaouenn da voulañ, hogen miret a- hed bloavezhioù. Ul labour n'eus emañ, moarvat, nemet un as- eut pezhioù dibabet a-douez kalz. Setu labour Bleimor, a skriva hep goulenn ha plijout a rafe d'unan bennak: evitañ e-unan dre ma oa re leun e galon, dre ma oa ret dezhañ skrivañ, sevel gant gerioù un ti da drivliadennoù e ene. Evit ar wech kentañ an hon lennegezh, kavet eo bet ur barzh da lakaat e holl ens en e varzhonegoù.

Aner e vefe klask e lec'h all ar pezh a rann Bleimor diouzh e genvreudeur: un den eo en deus gouzañvet kalz, ha diskuilhet e anken. N'eus mar ebet e oa Bleimor awenet ha donezonet dreist d'ar re all. N'eus mar ebet kennebeut e voe un dra vat evitañ bezañ harluet diouzh ar bed. Pa darzhas ar brezel, edo savet

war-lerc'h ar re all e karrigell barzhoniezh hon emsav "rann-vroel", ha dare oa da randoniñ d'eo heul diwar ar mein-hir, an iliz-paerz hag ar Vreizhadez aet da Baris. Ra vo benniget ar brezel-se, da vezañ pellaet ar riskl dioutañ, pa oa zoken d'e lazhañ.

Roparz HEMON, Barzhoniezh 1924.

84. KOLLET E MOR AR BREZHONEG

Edo bremañ oc'h evañ chokolad, c'hoant dezhi da gaout un aspirin, hag ur c'hoant diaes a-walc'h da seveniñ daoust dezhañ bezañ eeun koulskoude. Mevel ebet ne ouie ar saozneg en "Ardamez Dinan" ha poan he doa bet ar plac'h o c'hourc'hemenn un evaj bennak. Te ne felle ket dezhi kaout peogwir e ouie dre skiant-prenet ne vefe ket glec'hiet a-zoare, hag e vefe ur skrij e evañ. Kafe ne oa ket diouzh he blaz, er c'hontrol da verc'hed ar vro a hañvale lonkañ kafe rouzig noz ha deiz. Brav e vefe aet ganti ur chug-frouezh bennak, hogen penaos e c'houlenn? Dibabet he doa enta un tasad chokolad, ha daoust d'ar ger da vezañ an hevelep e brezhoneg hag e saozneg, e addistagañ pemp gwech he doa ranket evelato kent bezañ komprenet gant ar mevel. Petra 'vefe enta evit gourc'hemenn un aspirin gant ur werennad dour fresk? Daoust hag aspirin a veze lavaret aspirin e brezhoneg zoken? Sur a-walc'h ne veze ket, en ur yezh ken pell diouzh pep tra a anaveze.

Prenet he doa ur yezhadurig brezhonek "Ar brezhoneg en ur sizhunvezh" e anv, hag ivez ur geriadurig-dorn saoznek-brezhonek, hogen ne oa ket evit kavout ar ger "aspirin" ennañ. Da grediñ oa n'o deveze morse poan-benn ar Vrezhonek. Ar gwellañ a vefe dezhi mont e kêr betek kavout un ti apotiker. Ne rafe ket. Re skuizh e oa. Chom a rafe en hec'h azez dirak he zasad chokolad

73  
da c'hortoz Yun da zegouezhout. Diwezhat e oa ar paotr. Daoust ha netra fall ne vefe c'hoarvezet gantañ? Ur chañs e oa c'hoazh en he gwalleur gallout kontañ war un den ken hegarat, habask ha kalonek eveltañ.

Yann-Vari KERWERC'HEZ, En ur rambreal 1943.

85.

BIZIED AR WINIENN

Gant krap ar sap, bountenn ar winienn a wint a-gleiz hag a-zehou he biziedigoù. Plom e sav, hep arsav, e tommer taer miz gouere. Hiraat a ra bemdez; bemdez e tispleg deil nevez, skañv, evel dantelezh, hañval ouzh eskell roet d'he gwanded evit nijal en aer eus an amzer. Hag a bep tu ec'h astenn he bizied tenn, krommet ha rodallet o zri kraban bihan.

Harp a glaskont ha krog. Harp da grapañ uheloc'h; krog evit diwall a zevalañ. Rak uheloc'h, bepred uheloc'h, dreist ar c'hogus, trema an heol, emañ youl ar vountenn foll monet. Met harp na gav ket, na krog kennebeut.

Harp e kromm he bizied, he c'hrabanoù a-nebeudigoù. Emberr, liant e punont en aer sklaer, evel pa vefe tu dezhe en o rouell derc'hel avel: kavout narzell divrall war voged.

Evel-se bemdez e ra ar barr un hed trema al laez, ha bemdez e serr ivez bizied nevez war... netra.

Betek an deiz ma teu ar vrinsenn gwevn da vout re bonner ha ven. Neuze, diskalonek, e pleg he fenn trema ar glen, e skoulm gwarez he bizied fresk ouzh bizied bresk ur barr arall, outi hañval, dinerzh evelti.

Loeiz HERRIEU (1928)  
Dason ur galon 1957.

Ur gambrig e oa, ar panelloù anezhi livet en aour hag e gwenn, war ar mogerioù ouzhpenn dek melezeour. Pintet war un doare peul en ur c'horn e oa ur marmouz oc'h ober orbidoù en ur chaokat ur graonenn. War ur peul heñvel en ur c'horn all, e oa ur peroked. An daou loen a oa staget gant chadennoùigoù aour. Un daol dirak ar melezeour brasañ a oa damguzhet ar golo anezhi gant boutailhoù, orselioù, boestoù bihan a bep stumm, kriboù, broustoù, a bep seurt binvioùigoù ha bravigoù, ur bern trao arc'hant, aour, gwer, strink, koural, hag olifant o lufrennaou iñ, ken ouzh sklerijenn an deiz ken ouzh goulou un ugent kant-ol bennak war enaou. Azezet e-kreiz ar gambrig, war ur skabell emichañs, nemet ne weled ket gant he lostenoù hag he brozhioù ledan o wagenniñ betek al leur tro-war-dro dezhi, e oa ur vacuez ha na oa mui yaouank-yaouank, evit d'he dremm bezañ livet, truskennet ha poultrennet hag he blev rodellet ha fichet da glask he digozhañ. N'he doa korfenn ebet, nemet ur gorfkennig satin melen strizhet en-dro d'he dargreiz, o lezel he divskoaz, he divvrec'h hag un darn vat eus hec'h askre en noazh. Ar plac'h a gambr, ganti en un dorn ur grogenig-vaot leun a boultr hag en egile un doupenn, a oa oc'h echuiñ kempenn he mestrez. Houmañ, en ur vousec'hoarzhin, a astennas he bizied ivinet-lim-estra davet Levenez, a reas ur stouadenn, pa na ouie ket ober gwell.

Roparz HEMON, Mari Vorgan 1962.

## UR SKOUER A EGOR ISTOREK

S.A.D.E.D. en e zerou a embanne ur pal politikel, met sev-enadurel e chome an darn vrasañ eus e labour. Ken ma c'hallas mirelourion dont da labourat ennañ. Pal ar strollad o vezañ ez-

taolet ent difetis c'hoazh, ne oa kenstourm ebet etrezañ hag amkanioù an dud-se. An dud-se koulskoude ne oant ket evit heuliañ ouzhpenn un tennadig eus an hent a gase da bal ar strollad,- rak anat e tlee bezañ buan n'edont ket en hevelep amzer istorek hag eñ. O bezañs er framm dispac'hel oa a dra sur un azon a anistor evit ar framm. Hemañ, o vont war-raok, a voe e tro da reiñ muioc'h a fetisted d'e bal ha, da heul, ez anadas an dislavar etre pal ar framm hag amkanioù ar virelourion a labourer ennañ. Diskarzhañ ar re-mañ a voe hepken reiñ dezho o lec'h reizh; o fellaat a voe reiñ fetisted d'ar pellder gwirion ma edont diouzh an Emsav. A-raok o diskarzh e oa ar pellder-se goloet, hep eztaoladur fraezh, hep ster na perzh politikel. Gant an diskarzh e oa dizoloet, eztaolet, e teue da vezañ un arvez politikel eus ar framm; lavarout a reomp c'hoazh: e kemere ar pellder-se furm un tamm egor istorek.

EMSAV 36/367 1969.

## AR WEZENN DILH

A-wechoù e teue, goude graet ganti he zroioù war ar maez, da azezañ ur pennadig gant ar gwraez all, e disheol ar wezenn dilh a astenne deliaoueg he skourroù a-us d'an aod.

Gwraez ha merc'hed ar bourk a zeue eno, brav an amzer anezhi, war vord ar mor, da vesa o re vras, krennarded, a weled o c'hoari du-hont war an traezh; darn anezhe a rae stamm, darn all a wrie, ha ret eo din henn lavarout pa'z eo gwir, holl e teuent da gaozeal, da virbilhat, ivez da glufanañ. Eno, dindan ar wezenn-se, e vezent eürus, ankouast gante o zrubuilh, o displijadur, alies o anken. Rak pet anezhe a oa o gwazed war ar mor, aet pell-pell diouzh ar gêr, ha pet all... Met honnezh a oa hag a vo o buhez, hag a oa bet hini o mammoù en o raok... Ar

wezenn dilh enta he doa klevet... Bremañ, siwazh... E'm bugaleaj, bev e oa c'hoazh ar wezenn; abaoe, kozh-douar, krignet gant an oad, disec'het war he zroad, diskaret eo bet gant ur barr-avel.

Ar wezenn dilh!... Pet rummad a Lokiregiz zo bet o tis-heoliañ, o tislaviañ dindan he delioù: gwazed, merc'hed, martoloded, pesketaerion, maltouterion! Dindan ar wezenn, pe harp outi, pa veze divalav an amzer, glav hag avel anezhi, ar wazed eno a zeue, surca pe galabousem war o fenn, war o c'hein ur porpant eouliet, botoù-koad goloet en o zreid, o chik en o genou hag o daouarn en o godelloù. Ac'hane e vesaent aketus o bagoù bihan ha bras, o bagoù bountet gant an avel, sachet gant ar mare, stropet ha ruilhet gant an taolioù-mor.

Fañch al LAE, Bilzig 1925.

89. AN EMSAV HAG AR BED

Anat eo emañ Breizh evel pep pobl e-kreiz ur vaezienn a levezonoù liesseurt. Azon an anistor eo avat e c'hoarife al levezonoù-se ganti evel gant un danvez marv; azon ar brizhem-saverezh eo ne oufe ar vrogarourion vrezhon tennañ eus al levezonoù emsavel estren a c'houzañvont nemet marmouzerezh e-maez buhez. Anavezet e vez an Emsav diouzh ma'z a al levezonoù d'ober kevala gantañ. An Emsav a gemer diouzh e ezhommoù ar pezh a zo ret da vevañ, krouiñ ha kreskiñ. Kavet en deus Kembre er mare-mañ-mare ha Lenin en ur mare all; lavaromp trugarez vras da Gembre ha da Lenin, evit an Emsav hag evit e hanezourion a gavo aze an tu da gontañ traoù burzhudus war orin protestant ha bolchevik Breizh nevez; lavaromp ivez, dinec'h-kaer, ma ne vije ket bet eus Kembre pe eus Lenin, en dije an Emsav tennet e vad eus broioù hag eus tud all. War roll ar bourchaserion kevala e c'hellomp lakaat kement sevenadur, kement pobl ha kem-

nt sevenadur, kement pobl ha kement luskad politikel a zo er bed kempredel ha tremenet. Plijet pe get, ez eo Frañs hon brasañ pourchaser er mare-mañ, ha pa ve en arbenn eus ar sanailhad ramzel sanket ennomp gant ar skolioù gall. N'eus ket da vezañ mantret gant ar saviad-se avat,- gant ma ne bado ket re,- rak, evel ma lavar an Avisel: "Kement a zebromp a ziskenn er c'hof ha goude-se er c'haoc'hlec'h".

EMSAV 28/118 1969.

90.

AR GAOUAD

Penaos e oa hi deuet ken fonnus, ar gaouad? Hini ne gomprens. Pardon sant Gourzhiern a raent en devezh-se, en iliz, hag un heol roueel, tro ar beure, a strewe en oabl madelezh e derennoù tomm. War-dro kreisteiz, deuet ur skeutrenn liv plom a sol ar gornog-kel, ha gronnet dezhi dremm an heol.

Kousket a rae ar mor, tuchant. Tonnoù hir-hir, lavagnon an devezhioù rostaj, a bigne d'an sod war o gear; hag aze, dibreder, c'hoari a raent evel bugale gant blev bezhin ar c'herreg bras.

Glav a daole. An holl em zastume en o ziez, serrret an nor warne. An noz a zeuas, ganti an son. Soñjal, pediñ, ouelañ, ne ouient mui kalz pe benn a yae dezhe a-rack, kristenezed paour an enez. Kaer o sozañ en o gweleoù, ar vugale ne gouskent ket. Piv en defe gallet ivez, un noz c'harv evel honnezh? Glav a daole en diavaez, e-barzh an tiez, daeroù... Antronoz, un doare souezhus a rae tro ar c'hêrioù: tri zi oa digor-kaer edan ar wallamzer, gwintet o zoennoù d'an avel ugent kammed pelloc'h, war al lann. Truezegezh war druzegezh, bremañ.

BLEIMOR  
( Dihunamb 158 1924 )

N'eus gounid ebet gant ar bleuñv. Ne servijont da netra. Ken eumoc'h e c'hallfe bezañ graet an traoù. Livioù ha furmioù dispignet en aner.

N'eo ket. Ar bezañ zo abeg a-walc'h da bep boud. Ha bleuñv ienn ar bezañ eo al levenez. Galvet gant Doue eus teñvalijenn an nannboud e respont pep tra dezhañ gant levenez.

Ar bleuñv eo leunder lusk ar plant, narzh ar sapr o tic'hlannañ, barr o levenez o respont d'an heol. Ar bleuñv eo barr ar fiñv-tro, evel pa 'z oc'h mezevellet war-grec'h lañs ur vranñsigell, pa santit e tispak eskell deoc'h. Levenez al lusk o vont war-raok evit padout, o vonet evit chom betek an termen merket, evit lavarout hag azlavarout ar gentel: "N'eo ket ar gounid abeg an traoù".

Ar genad eo abeg a-walc'h d'an traoù kaer.

Maodez GLANNDOUR, Komzoù bev 1949.

n'o deus ken c'hoant nemet sachañ un nebeut profoù digant o mistri. Hogen penaos e stourmint outo? Ar re-mañ o deus graet o c'hontoù; an disoc'hoù anezho zo diarvar: hanter re a dud zo o vevañ war ar maez e Breizh c'hoazh. Nemet e plegfent da baeañ an dud d'ober netra ne c'hellont ket asantiñ d'un diskoulm a zo war o meno enebarmarzhel.

Un nebeut promesaoù zo bet graet, loar skedus al lezenn-stur istribilhet e lein oabl Breizh, ha Yann Guer zo distroet d'ar gêr fur ha fizius. Kuitex d'ober un tammreuz ur wech bennak adarre e-giz ur bugel mign ma ne reer ket van da selaou outañ.

Bezomp sur ne ray biken ar gouerion ur gwir zispac'h e Breizh - nemet p'o devo komprenet n'eus ket anv a vara hepken en o emgann hogen eus o dellid a dud hag a Vreizhis.

Youenn OLIER, Tonkad 62.

92. AN EMSAVADREGOU KOUERION EN HON BRO

Kredet en deus meur a hini warlene e oa prest gwerin Vreizh d'en em sevel evit kaout un tammig muic'h a amann war he bara.

Krediñ e oant prest d'ober un dispac'h war zigarez e raent un tammig trouz hag un tammig dizurzh a oa amoet. Er mennoziou da gentañ emañ an dispac'h, n'eo ket en oberoù. Hogen, dres, daoust ha mennoziou o doa ar gouerion warlene? Nann, siwazh. Daoust hag ur gelennadurezh o deus diwar-benn ar gevredigezh? Daoust ha meizañ anat a reont puez ha stad al labour-douar er sevenadur a-vremañ? Siwazh n'int nemet ar geizh a c'houlenn gant kri an aluzon; 'm eus aon ez int sklaved atav, sklaved ha

Abred e teu an noz e miz Genver hag ouzhpenn-se teñval e oa bet an amzer e-doug an deiz hag an avel o yudal er gwalarn. Filo a oa mall warni erruout er gêr da bakout ur banne kafe tomm a-raok mont d'he gwele. Pa zeue e-biou da Bont-Krist e washaas d'an amzer. Abaoe ur pennadig e seblante da Eloklevout estreget yudademoù an avel er gwez dre ma tostae ouzh ar maner. Pa voe deuet stok outañ, e klevas fraeshoc'h ur vouezh truezus o klemm evel unan o c'houlenn an aluzon e toull an nor. Filo a wiskas sin ar groaz en he c'herc'henn hag a stagas gant un De profundis. Uheloc'hik er waremm, a-gleiz d'an hent ma saver etrezek ar bourk, e wele Filo un dra bennak gwena o fiñval en noz. Krediñ a reas dezhi e oa un tamm liñser bennak hej-dihejet gant an avel. Met a-benn ur pennad e welas e taue al liñser war-

rack hag e tostae mui-oc'h-mui ouzh an hent. Mankout a reas he divesker dindani hag e kuzhas he fenn etre he daouarn en ur bediñ tra ma c'halle. Pa glevas ar vouezh klemmvanus o sevel stok outi, e kollas he fenn da vat hag e semplas. Ne oar ket pegeit eo chomet er foz c'hleb. Pa zistroas enni hec'h-unan gant ar yenijenn o kregiñ en hec'h izili, ne oa mui trouz ebet war-dro. Torret e oa un tammig d'an avel hag ez en em ruzas Fila betek ar gêr da vont d'he gwele war-eeun, kroget an derzhienn enni. Ma ned a ket gwelloc'h dezhi fenoz e vo galvet an Actrou Kromm da vont war he zro.

ABROZEN, Pirc'hirin kala-goañv 1969

94. AN ARGADENN-NOZ

Hag ar ruzell-veure eo anezhi? Peseurt heol zo o sevel?  
Ec'honat heol! Petra al laboused? Dre-holl emañ o mouezhioù.

Sklaer eo pep tra, n'eo ket an deiz avat.

Trouzal a ra pep tra, n'eo ket mouezh al laboused avat.

An treustoù eo a luc'h. Ar prenester eo a c'harm. Hag e c'harmont, ruz, betek an enebour a zo ahont er maezioù flamm-inek, e c'harmont: an tangwall.

Ha gant o c'housked roget war o dremmoù, e tifrae an holl, hanter-houarn, hanter-noazh, a gambr da gambr, a repu da repu. o klask an diri.

Ha troc'hed o anal e c'hagouilh an trompilhoù er porzh:  
strolladeg, strolladeg!

Ha taboulinoù o krenañ.

Ar banniel avat, n'emañ ket aze.

Galvoù: Korned!

Mirc'hed pennfollet, pedennoù, hopadeg.

Sakreoù: Korned!

Hag ur wech c'hoazh: Korned!

Hag er-maez gant ar mirc'hi feulzet.

Ar banniel avat, n'emañ ket aze.

Redek a ra ken na red dre bondalezioù o tanflammañ, a-dreuz dorioù oc'h enkaat, ruz-glaou tro-dro dezhañ, dre zerezioù ouzh e zeviñ, ma tibouf diouzh ar c'hastell ast gouez. Dougen a ra war e zivvrec'h, evel ur plac'h wenn semplet, ar banniel. Hag e kav ur marc'h, hag ez eus evel ur c'hri: a-dreuz pep tra, bu-anoc'h eget an holl, e dud zoken. Ha setu ma tihun ivez ar banniel, ha ne voe biskoazh ken roueel; ha bremañ e welout a ra an holl, pell en o rack, hag ez anavezont an den sklaer ha didokaru, hag ez anavezont ar banniel...

Setu, avat, ma krog da luc'hañ, ma sailh ent trumm, ma vrasa, ma teu ruz-bev...

Setu n'emañ o banniel o teviñ e-kreiz an enebourion, hag e taoulammont war e lerc'h.

Rainer Maria RILKE, Kanenn Hini Langenau 1905  
(tr.br. Olier MORDREL 1932)

95. KEUZ WAR-LEERC'H...

An ozhac'h kozh en em stleje d'ar gêr, mall warnañ degouezhout gant aon mankout en hent. Daeroù a zalle e zaoulagad hep gallout ruilhal dreist ar malvennoù. Sellout a reas en-dro dezhañ, hag e kredas edo an hent dianav. Ar gwez a oa uhelaet o ment, krommet o gwaregoù, kresket o skodennoù ha koshaet o oad, hag eñ en em gavas, en ur spontadenn, dizeriet ha diamzeriet. Delioù kras a fiñvas etre e dreid. En tu all d'ar c'hleuz, un aneval a zaoulamm e strouezh ar foz hag a drouzas er c'helenn.

- Pemoc'h! a lavaras ur vouezh.

Kefioù an targosoù a dridas war an oabl.

- Pemoc'h! a hope an targosioù.  
 An avel a c'hwitellas en-dro dezhañ.  
 - Pemoc'h! a c'hwitelle an avel.  
 Ar vein kizidik a skrijas da bep kammed dindan e dreid.  
 - Pemoc'h! a skrije ar vein.  
 An hini kozh a yeas buanoc'h. Ar mouezhioù euzhus a rede  
 d'e heul, a greske, a dregerne er parkeier, er c'hoadoù, a dam-  
 alle, a vrude...  
 - Pemoc'h! a c'harmas ur vouezh all.  
 An tad a zisac'has eus e sav e-kreiz an hent. Klevet en  
 doa fraezh e poull e galon mouezh e verc'h Lotea o tamall he  
 marv d'e bizhoni.  
 Nann. Ene Lotea a oa pell diouzh ar safaroù douarel, pell  
 diouzh hon 'harrhentoù...

Jakez RIOU, Geotenn ar Werc'hez 1934.

#### KUDENNOU POLITIKEL AR RIEZOÙ SOKIALOUR

An diforc'h-diazezez etre ar renadoù sokialour hag ar renadoù  
 frankizour zo en termenadur a roont d'ar politikerezh. Evit ar  
 frankizourion ez eo tizhet pal ar politikerezh pa vez dalc'het  
 an urzh, ar berzh hag an diogelroez er riez. Evit ar sokialour-  
 ion ned eo ar politikerezh nemet un arvez eus ur praksiz hollel  
 kevastenn da istor a-bezh an denelezh. Barn a reont kement ober  
 e-keñver e bal nesañ, pleustrek, hogen ivez bepred en e zisoc'h-  
 où pellañ e-keñver diwezhañ istor an denelezh. Pal an istor avat  
 ne vez anavezet nemet dre ar gelemadurezh, ha houmañ eo a  
 c'halver bepred da zevarn ster gwirion, istorek, pep darvoud ha  
 sokialour. Alese pouez ar breutadurioù kealiadel er politikerezh  
 sokialour. Alese ivez "avanturioù an daelerezh" sokialour; ar  
 riezioù sokialour zo riezioù evel ar re all, hag o levierion a

83  
 rank pleidiñ kement hag al levierion frankizour da zerc'hel enno  
 an urzh, ar berzh hag an diogelroez; ar palioù "klasel"-mañ  
 diwezhañ n'emaint ket dre ret war hent pal marksour an istor,  
 en e rageneb e vezont zoken alies. Dav eo koulskoude da gement  
 embreg war an dachenn kacout e gantreizhadur damkanel, ha d'ar  
 gelemadurezh atebañ war gement kamadro eus al leviadurezh. Aze  
 emañ arbenn an diaesterioù diniver a sav etre ar riezioù sokial-  
 our o-unan.

EMSAV 49/18 1971.

97.

SADORN FASK

War ribl ar stêr. Glav zo: ur reolennig put a ruilh hep  
 arsav eurioù-pad. An dud e-tal dezhañ a ya fonnus e-biou, pleg-  
 et o fenn, krizet o daoulagad rak an dour. Eñ a gerzh goustad o  
 sellout ouzh an dour a red, etre e ziv voger vaen. Petra bourr-  
 usoc'h eget monst evel-se, war ho koarigoù, pa daol ar reolenn  
 he bannigoù munut war hoc'h eneb. Ho plev zo glebiet ha beradoù  
 a ziskenn en-dro d'ho taoulagad...

E korn ar pont. Ur rizennad avel a sav, a c'hwez en e eneb  
 ur frevad glav munut. Serret e zaoulagad: nend eo ket mui amañ.  
 War vourzh ur vag eo. Ur vag a bluch, hoskallet e gwar an houl.  
 Ar fru a strink bep gwezh, hag an eon a red a-hed, ouzh bours-  
 elloù ar vag, evit chom a-dreñv, erfin, evel ur roud hir hag a  
 zeu goustad etre glas dour ar mor ha glas dour an oabl.

An dour a ziver ag e vlev gleb, ar glav a daol war e eneb,  
 yen. An tan neoazh en e galon. Hag e sellou a ya war an houl a  
 ruilh hep skuizhañ; an taolioù a darzh en ur deurel eon a-strink  
 war ar vag a droc'h pennek e hent, ha warni, hi, e-tal dezhañ,  
 paket en he mantell, stouet he fenn, met lies a wezh e c'hell  
 tapout, e korn he lagad, ur minc'hoarzh.

Nijet ar rizennad avel, ar glavig a ziskenn atav... Glav warnañ, glav war Itron Varia, glav war c'hlasvez yaouank ar gwez.

R. PENIARH  
( Gwenedour 3 1963 )

98. AR C'HEVALA ISTOREK

E gwir, an natur hag ar spered n'en em gavont nepred noazh an eil dirak egile, met bepred enkorfet en o c'henfrouezhioù, en o c'henderc'hadoù kent. An "natur" labourer gant ar barzh zo ar yezh, met ar "spered" labourer ez eo zo ivez enkorfet er yezh. An "natur" aret gant ar politikerezh zo e gwirionez un denelezh pleusket endeo gant kantvedoù a sevenadur hag a stadelezh, met ar "spered" arer, an arer politikel, zo ivez gwirizennet en hevelep kantvedoù a sevenadur hag a stadelezh. En ur ger, ar sevenour, an den a Stad zo tud gwirizennet en ur c'hevala istorek hag o kenderc'hañ dre araez ar c'hevala istorek-se.

Un anien-etre eo hini ar c'hevala istorek: natur eo e kement ma trebad a remziad da remziad, ha ma talvez da zanvez da genderc'herezh ar remziad o ren; spered eo e kement ma n'en deus bezoud nemet e-sar un ober denel. Drezañ ivez, peogwir e vez savelet ent istorek, en ur furm amzeriek, e vez anavezet d'an amzer al lec'h bras ha dibarek he deus e kement a ra mab-den. Ur boud istorek eo mab-den hag emañ e deñzor en e istor: brasañ torfed eo mirout ouzh ur bobl a gorvoñ he c'hevala istorek.

EMSAV 25/23 1969.

99.

KENGARANTEZ MANOS HA BENA

85

C'hoazh e lavar kanenn Vopiskos ne voe biskoazh an distersañ diemglev, an distersañ dael, an distersañ breutadeg etre Manos ha Bena, hag en un tu gant se emañ ar c'hanennoù all a'm eus klevet. E kement-se, enta, evel e pep tra, e voent melezeur ar c'houbladoù da zont. Ha war-dreuz e tegouezhe gantañ un dra pe dra, e skoe Manos skañvik an douar gant e droad; damstouñ a rae e benn hag e vane war var ur predig-amzer en ur zantañ e viz-meud. Neuze e save e dal, e selle ouzh Bena hag en em roe da vousec'hoarzhin. En hevelep doare, Bena, pa c'hoarveze dezhi un enebiezh bennak, a heje kudennoù he fennad-blev melen, a rae un huanadenn, a stoke he dorn ouzh he zal, evel evit e beurzivorenñ hag, o treiñ ouzh Manos, a selle outañ hag a vousec'hoarzhe. Ne voe tra biskoazh evit strafuilhañ o hegarated hag o sioulded-spered, nag an emglev-mat, an unvan hag ar gengarantez o ren etrezo; ha seul souezhusoc'h eo se ma tremen ar peurliesañ ar ouenn ma oant diwarni, ken a-berzh tad, ken a-berzh mamm, evit bezañ taer, feuls ha brouezus dreist ar re all.

Sketla Segobrani, Kentañ levrenn 1925.

100.

TORRERION EG'HWEL KASTIZET

Trouz ur c'horf, stlapet war ar straed evel ur sac'had avaloù-douar: ur "Judaz" all, semplet, o tufat e zent e poulladoù gwad fetis, a oa aet da gavout e geneil er wazh.

Kann a oa en ti, hag arrebeuri o ruzañ, ha gwer o terriñ. Rak erru e oa Ivon Trebern brav-bras evit kacout e lod-jabadao. Gwelet en doa ar bagour an taol luziañ-pav. Aet e oa gouez. Ha n'en doa ket graet ur pleg paotr e luziañ-pav etre e zaouarn ramz. Un taol dorn 'kreiz e zent, hag er-maez.

Krog edo gant an trede, hag e ruilhe gantañ war al leur-zi  
mein hag e tic'haste outañ. Egile avat en em zifenne kalonek.  
Tageñ a rae gant e zent, skeiñ a rae taolioù treid, pe e turie  
al leurenn gant e votoù-ler tachet, roc'hal a rae, dre ma sanke  
e ivinoù e gouzoug ar bagour.

Ken prim, ken dillo e oa tarzhet ar reuz, ma oa chomet Paol  
Tirili digor e c'henou da gantañ. Sabadac'het.

Faotr kozh e varv hir, ivez, a oa bamet an tamm anezhañ,  
en e gorn. Neuze e lakaas e zorn dehou e chakod e feskenn, e  
zaoulagad o parañ war an Taro o tegouezhout.

Paol, avat, tommet e wañ, ha disaouzanet, en doa kroget  
en ur sifon war un daol. Hag eñ ha mac'hañ war al lañchenig,  
oc'h eeunañ daoulagad ar c'hozhig. Chintrañ a reas taer an dour  
trenk. Dallet, beuzet barv ha dilhad ar c'hozhig; hag e flietre  
an dour atav.

Ha setu un tenn o strakañ; hag ar meleour bras o sklentañ,  
mil faout ennañ.

- O torc'h moal, "flaerieu" kozh, en doa an Taro amzer da  
leuskel. Ur revolver? Del! Loen Kain!...

Un diael a daol botez e revr an hini kozh, ha hemañ, d'ar  
piltrotig, prim-prim, betek kreiz an hent, ma tisac'he en e vern,  
gant ur c'hlemm truezus, e zaoarn ouzh e zargreiz.

Youenn DREZEN, Itron Varia Garmez 1941.

#### AN ABL DU

( En ur grial evel ur marc'hadour )

Me zo 'n hini a ya dre ar vro, atav prest  
da werzhañ, da brenañ, da reiñ e trok pe brest;  
pa vez serret an nor ez an gant ar prenestr.  
Me n'eo ket va c'henwerzh gant an diskourioù hir;

va fouezioù a zo plom, va balañs a zo dir;  
ne werzhan tra, nemet a briz anat ha gwir.

N'eo ket war c'horre an aer  
e vez ar marc'hadourezh;  
eo war an douar ponner  
en un ti maen-benerezh.

N'eo ket gant ur banne glizh  
e ran bemdez va bevañs;  
ya gant kig ha yod fetis  
sistr divadez ha gwir Frañs.

Me zo ar gwir varc'hadour  
a werzh pep danvez er foar,  
nemet an aer hag an dour,  
nemet an heol hag al loar.

Me 'bren ha me 'brest d'an holl:  
arc'hant gwenn pe moneiz du;  
me 'lak ar gont war an daol,  
kalz pe nebeut, met diouzhtu.

N'eo ket pemoc'h va leue;  
me n'on ket dall kennebeut  
pa vez ar per re zare,  
pe brenn mesket gant ar bleud.

Rak-se, selaou un ali mat,  
kamalad,  
pa 'z out evit ober marc'had:  
aviz on dit e ri gwelloc'h  
ha furoc'h  
sellet mat dindan lost ar vioc'h.

Tangi MALMANCHE,  
Gurvan ar marc'heg estrañjour 1923.

Kement en doa laret Baloo diwar-benn ar varmouzion a oa ar wirionez rik. Lod oant eus lein ar gwez hag evel ma sell dibaot-tre al loened ouzh krec'h, ne oa ket tro evit ar varmouzion ha Pobl ar Janglenn da gejañ kenetrezo. Nemet da bep tro ma kavont ur bleiz klañv, pe un tigr, un arzh gloazet, e stag ar varmouzion d'o heskinañ. Teurel a reont bizhier ha kraoñ ouzh n'eus f rzh pe loen evit c'hoari, e spi da dennañ warno an evezh. Ha neuze e huchont hag e c'harmont a-bouez-penn kanaouennoù hep penn na lost, hag e pedont Pobl ar Janglenn da grapañ ouzh o gwez evit en em gannañ outo pe e stagont hep abeg ebet gant emgannoù fuloret kenetrezo, hag e lezont ar varmouzion marv e-lec'h ma c'hellfe o gwelout Pobl ar Janglenn. Bepred e oant war var da gaout ur rener, ha lezennoù ha gizioù dezho o-unan, met bisk-oazh n'o deus graet, rak o eñvor ne zeu ket a-benn da zerc'hel soñj eus un deiz d'an all, nemet e kempennet an traoù gant ur c'hrennlavar: "Pezh a soñj bremañ ar Bandar-Log a vezo diwezhatoc'h soñj ar janglenn", ha kement-se oa evito ur bras a frealz. Loen ebet ne c'helle o zizhout, nemet diouzh un tu all hini ebet eus al loened ne rae van outo, ha setu perak e voent ken plijet pa zeuas Mowgli da c'hoari ganto ha pa glevjont pegen feuket e oa Baloo.

Rudyard KIPLING, Levr ar Janglenn  
(tr.br. Fañch ELLES-ABBOZEN 1962)

PE OBER EVEL MA RA "GWENN-HA-DU" . . .

- "Ur munud, mar plij. Chomomp en traoñ. Sentus omp bet, e Pont-'n-Abad, amañ, e-giz bugale bloaz, aotrou Kilevere. Doujañs hon eus bet, pell, pell, pell amzer, d'an Urzh, evel m'eo diazezet war al Lezenn, paet hon eus rolloù, aet omp da soud-

arded. Marv omp zoken, pe bet mac'hagnet, a-vil-vern, war an tachennoù-enor. N'eo ket gwir?

- "...

- "Bet hon eus e gopr, Doue ra vo meulet, ha Mistri an eur ivez, bet hon eus peoc'h, Labour ha bara. Da ober teil. N'eo ket gwir?"

- "...

- "Hag e ranker bezañ gwall-bennoù fall, hag ur bobl goulonkus, ha dispac'herion, un euzh, evit bezañ en em lakaet en ec'h-wel, daoust da se, ne gav ket deoc'h?"

Argilañ 'reas ar beleg gant an dalmadenn. Lavarout a reas:

- "M eus eon e komzez, e gwirionez, evel an dispac'herion."

Neuze e tiorllas da c'hoarzhin.

- "Kouezhañ 'ri e'm lamm, kaer e vo... Daou vestr a vo hag e senti outo atav, kaer e vo!... Ya! paotr. Dre gaer pe dre heg. Rak ganto emañ an Nerzh! Hervez m'eo bet kemennet a-viskoazh, gant an Aotrou Doue. Lenn a c'haller en Aviel, komzoù-stur hon Salver: "Ro da Gaezar pezh a zo da Gaezar, ha da Zoue pezh a zo da Zoue"...

"Kaezar, da lavarout eo Gouarnamantoù ar vro. Kaezar a c'hell faziañ, bezañ direizh, drouk zoken, e-keñver den pe zen, pe korn pe gorn eus ar vro. Setu, end-eeun, pezh a c'hoarvez gant hon Breizh dindan renerezh Paris. Dimp-ni, avat, da stourm ha da zerc'hel peg, evit ma vo roet dimp hon lod, hervez hon gwir hag al lezenn. Pe..."

Hag e chomas berr war e frazenn.

Ne responte ket ar c'here. Ma rankas ar beleg bihan displegañ e veno, eeun-hag-eeun. Izelaat a reas adarre e vouezh:

- "Pe ober evel ma ra "Gwenn-ha-Du"... Ma ne roer ket dimp dre gaer, sachañ davedomp dre heg!..."

Youenn DREZEN, Itron Varia Garmez 1941.

Klevet 'c'h eus sur ar c'hrennlavar: "Hent stouvet dirak ar wirionez a zigor d'ar finesa". Mar lavarez, va mignon, d'an dud amañ ez out ur c'hereour paour o tec'hout rak e wreg, hag e'c'h eus kuitaet Kaero dec'h, ne vi kredet gant nikun, ha goap a vo graet ac'hanout dre-holl e kêr; mar lavarez out bet douget gant un djinn war e gein, e vo spontet an holl o soñjal ez out e dalc'h an droukspered.

- Petra ober neuze? eme Varouf gwall chalet.

- Warc'hoazh vintin, eme Ali, e pigni war gein va mul kaerañ hag ez i d'ar marc'hallac'h. Unan eus va sklaved a gerzho war da lerc'h. Eno e kavi ac'hanon azezet e-touez ar varc'hadourion vras. Kerkent ha ma'z kwelin e savin hag e pokin da'z torn gant ar vrasañ doujañs. Ober a rin dit azezañ e'm c'hichen, hag e rin bep seurt goulennoù guzhit, a-zivout marc'hadourezhioù, evel: "Daoust hag an danvez-mañ-danvez zo geneoc'h?" Ret e vo dit respont: "Ya sur, hag e-leizh." Pa fello d'ar re all gouzout piv out, e lavarin ez out ur marc'hadour pinvidik ha brokus. Mar deu ur c'hasker da c'houlenn aluzon diganit, e roi dezhañ aour. E-giz-se e kredo d'ar varc'hadourion ez out un den da enoriñ. C'hoant o devo d'ober anaoudegezh ganit ha da genwerzhañ ganit. Marc'hadour pinvidik e gwirionez e vi kent pell.

An Nozvezh ha mil, Marouf kereour Kaero  
(tr.br. Roparz HEMON 1964)

BR C'HOAD

Guzhpenn hanteret e oa an noz, pa ganas un eostig er c'hoad divent ha teñval, tost d'un digoadenn sklaeroc'h, gwaskedet tro-war-dro gant melladoù gwez deliaouek. Sioul e oa pep tra, war-

bouez nebeut, nemet e save, bep ur mare, un hiboudig kuñv ha leun a beoc'h e-touez an delioù o taskrenañ dindan anal an aezh-enn-hañv. A-wechoù ivez e trouze ar strouezh hag ar bodadennoù keuneud yaouank, pa dremene drezo loenedigoù preizher o klask o boued.

Fa dregernas mouezh heson ar c'haner-ros, e tavas krenn an trouzoùigoù, evel pa vije bet sebezat ha boemet ar goadeg-veur hec'h-unan gant an hud dudius hag iskis a skigne ar sonerezh lirzhin. Amañ hag ahont e kanas d'o zro eostiged all, evel heklevioù niverus o respont da ganaouenn labous an digoadenn, doare gantañ da vezañ ur mestr soner o kenteliañ breudeur, un dudi o c'hlevout ivez, hogen divarrekok'h egetañ un nebeut da embreger o mouezh. Hag e-keit ma rede, a-dreuz skourroù bodenn-ek an derv kantviciaziek, bommoù flour ar ganiri estlammus, ur c'horn eus an oabl steredennet a ree ur volz arc'hant louet a-us d'an digoadenn motet en he c'houisk.

Yeun ar GOW, Ar Gêr villiget 1962.

GOAÑV

Fa gouezhas an avel, an oabl a deñvalaas hag ar glav a zeraouas diskenn, a-builh. E-pad devezhioù ha devezhioù e tarzhas ar c'houmoulennoù war ar vro. Ar poullou a leunias: an hentou a droas da wazhioù. Hag e kemeras an tiriennoù hag ar parkeier dindan hañ kement a zour ha ma c'hellont: buan e teujont da vezañ leunoc'h eget spous. Redek a reas an dour mui-oc'h-mui betek ober reier bihan. Diskenn a reas ar re-mañ d'ar stankenn. Ar stêr a ruilhas da gentañ dour lous ha da c'houde dour melen. Diwezhatoc'h e veze gwelet douar, ha goude mein, o tiskenn hep ehan betek ar foenneier. Ar geot a stouas dindan an dour, hag erfin an dour-beuz a c'holoas pep tra. Ar prad a droas d'ul lenn



santout a raent an hevelep tra, pep hini a ouie ne oa ket al  
latar an dra yen, skornek a yena betek an eskern, an dra a lak  
da sevel tasmantou spontus, met takennoù skañv, lugernus, treuz-  
welus, a zañs er goulou, a vrava kement tra a c'holo. Dizoleiñ a  
raent a-gevret al latar rak deuet e oant e-barzh e-lec'h chom  
er-maez anezhañ, rak bale a raent goustadit e-lec'h mont buan  
gant ur c'harr, rak sellout a raent gant selloù digor, prest  
da welout braventes an natur goloet gant al latar.

Joelle KERMOAL, Ar gwez el latar 1969.

AN DANGORELEZH

E-kichen an devoùoù muzuliadus e c'hoari an doare ma vez  
buhez an devoùoù-se gant an dud, o reiñ da emdroadur an dev-  
oudoù-se un durc'hadur nad eo ket dezreadus diwar an anaoudegezh  
ergorel anezho. Da skouer, ur barr-bevañ izel a c'hell bezañ buh-  
ezet pe evel un abeg da stourm ha da adsevel ar vro pe, er c'hon-  
trol, evel un abeg da zic'hoanagiñ ha da guitaat ar vro; anat eo  
e vo disheñvel-krenn emdroadur ar barr-bevañ hervez an eil doarepe  
egile ma vo buhez gant ar boblañs. Dre se ez eo dangorelezh hiz-  
iv evit un darn mamm da ergorelezh warc'hoazh, pe eunoc'h, hon  
doare da veizañ stad ar vro hiziv zo tad d'an doare ma vo stad  
ar vro warc'hoazh, evit un darn vras pe vrasoc'h. Lavarout a ran:  
evit un darn, rak dav eo diwall diouzh an daou fazi enebek ha  
kemparzhiek, an eil krediñ e c'haller dezren stad ar vro warc'h-  
oazh diwar he stad ergorel a hiziv, egile krediñ ez eo youl  
c'hlan an dud a-walc'h evit reiñ d'ar vro an dremm he devo  
warc'hoazh. Amañ emañ al lec'h da zeskrivañ un daelerezh o vont  
en-dro etre doareoù ergorel ar saviad hag an doare dangorel ma  
vez buhez.

EMSAV 50/57 1971.

O! an engroez daonet e Paris. An holl dud o ruilhal er  
straedoù, o c'harmiñ, o huchal, tannieloù Hungaria diepak. Da  
groaz-ru Chateaudun! Bee'h d'ar gomourion! D'ar groug Duclou!  
Budapest! Budapest! Ha va gar a ra poan din. Mont a ran avat,  
harpet war va flac'hoù. Kerzhout. Hudal. Redek ha redok a-benn-  
kaer da greñvedh ar re ruz. Foan a'm eus. Ne vern. Hungaria!  
Budapest! Dac d'ar volcheviked! Ar vicherourion. Petra a huch-  
ont? Ne dremeno ket ar faskouriezh? Te welo! Evel pa vijen  
faskour! Kouilhour! Lastez ruz! Da vMoskva! Hungaria! Budapest!  
Stlabez! Mardoz! Frankiz! Hungaria! Rusia d'an diaz! Dal war  
da benn, loustoni vev! War da fri louskenn c'hast ruz!

C'hweziñ a ran. Echu an abadenn. Emaon e Val-de-Grâce ad-  
arre. Skandalet on gant ar mezeg rak gwadiñ a ra va gloaz war  
va gar. Ne'm eus ket poan. Torret e'm eus ur flac'h war benn  
unan bennak: ne vern, reoù all ez eus en Arme. Bloñset eo va  
lagad kleiz ha digor gwareg va abrant. N'eo netra. Va Doue,  
evit ho pobl karc'haret e'm eus em gannet. Ar re-se a vallozh  
hoc'h anv santel, saotrañ a reont hoc'h ilizoù, lazhañ ho pel-  
eion, mougañ pobloù a-bezh... Dihun. Hervez Le Monde, ur mich-  
erour komunour a vije bet lazhet. Setu France-Soir. Met, me an  
hini eo amañ o sevel va flac'h! N'eo ket fall al luc'hskeudenn.  
Petra? Gant ur varrenn vetal o vije bet lazhet ar paotr? Va  
flac'h torret war benn unan bennak. Nann. N'eo ket me. N'eo ket  
posubl. N'eo ket gwir. Va Doue, ne c'hell ket bezañ, ne c'hell  
ket bezañ! Padal, al luc'hskeudenn. Me er renk kentañ. Va flac'h  
savet a-us da'm fenn. War ur penn, war ur penn all. Ha c'hoazh,  
ha c'hoazh. Ha va flac'h torret. Ar paotr o kouezhañ war al leur,  
e zremm gwad-holl. Me an hini eo. Muntrer. Setu ar pezh ez on.

Goulven PENNAOD, Ar c'hloarez 1970.

Bez' e oa en ney, iskisoc'h c'hoazh eget kemenñ-all a draoù iskis, skeudenn fromus ur bugel marv. Ur paotrig koant, pemp bloaz dezhañ pe war-dro, en e astenn war ul lenn dantel-ozhet, gantañ en e zornig disliv ul lugustrenn wenn. War e zremm dener e oa skrij ar marv, hag ivez ur skleurig dister a vuhez, evel pa vije bet an hini bihan kaezh o c'houlenn skoaz-ell. Bewech m'en em gaven dirak ar poltred e kinnige va c'halon tarzhañ gant an druez.

Hogen ne oa ket ar bugel e-unan-penn. En e gichen, en ur framm koad teñval, e oa skeudenn un den melkonius, dezhañ ur barv du ouzh e chink ha dilhad pastor a c'hiz kozh war e gein. Tad ar paotrig koant an hini 'oa, a lavare va c'henseil: hervez ar vrud e oa bet beuzet ar bugel e lenn Park ar C'hloareg, pell amzer a oa avat, peogwir e oa skrivet 1666 e korn an daolenn. Ur souezh pegen dedennet e vezen gant ar paotrig paour: karet 'm bije gouzout traoù diwar e benn ha diskleriadurioù a glask-en, zoken, war fas teñval e dad, hag a zegase da goun din, daoust d'e zilhad beleg, soudarded spontus an aoter.

STORM, Aquis Submersus  
(tr.br. Per DENEZ, 1950)

Edon, goude un neuviadenn bennak, o krazañ evel ur glazard, gant an heol e'm daoulagad. Astennet war al leton, e traoñ ur wezenn bin, me oa da din golsiñ va malvennoù, kement e lufre al lenn. Poan a'm boa gwelout tolzenn goadek Morieg, en tu all d'ar ganol, hag Anna Bodri a oa du-pod en amc'houlou. Pa laoskas ur c'harm drumm, ha hi ha dispac'hant treid ha divvrec'h, ken ma chintre uhel an dour en-dro dezhi. Mar'z piye gwelet al lamm

a ris e'm sav! Hag al lamm a ris el lenn! E pemp gourhedad e voen en he c'hichen.

"Ar glizi e'm daoudroad", a huannadas, hag e taolas he divvrec'h en-dro da'm gouzoug.

Lavaret 'm eus dit n'eo ket don an dour e Poull-Raned Konlev; evidon, da nebeutañ, p'on mentek a-walc'h. Houpañ a ris ar c'horfig fuilh war va divvrec'h hag e kerzhis, an houl-ennouigoù o saflikañ ouzh va chink hag oc'h izelaat dre ma tostaen ouzh an nod. Ur foeltr a dammig korf hebleg, Iribe, morzhedoù yaouank ha glan, un dargreiz mistr, hag ur galon o tripal herr ha taer, sko e'm c'halon-me!

Astenn a ris va c'heneilez war dirien ar c'head pin. N'he doa ket padet ar fallaenn, ha divesker an neuerez, frotet ganti gant raden ha douar goz, ken ma teujont rus-brulu, a redas ingal ar gwad en-dro en o gwazhied.

Youenn DREZEN, An dour en-dro d'an inizi

Graet e voe ar gouleunnata en arabeg gant ur serjant "treid du" anavezet evit e gasoni ouzh an Algerianned: e dad hag e vamm a oa bet lazhet en o atant er Mitidja.

O vezañ ma kendalc'he ar pevar den da chom mut ouzh e at-ersou e tennas ar serjant unan anezho dre e chupenn hag e stagas da skeiñ ouzh e zremm gant e veilhoù-dorn; berañ a reas ar gwad eus e c'henou hag un dant a skopas, hogen grik ne lavare. Neuze ez adkrogas ar serjant da skeiñ warnañ gant troad e Dompson. Flodiñ hag en em damolodiñ a reas an den evit herzel ouzh an taolioù treid. Dirollet e oa ar soudard gant an ernez ha mallozhiñ a rae evel un diaoul.

O welout e oa aner klask tennañ titouroù dioutañ e tiskargas

en e gof ur flistrad boledoù gant e vindrailherezig. Ur roc'h skrijus a laoskas an den, e gorf a zistennas hag e voe an diwezh.

Spi mat en doa ar serjant e komze an tri den all o welout an tonkad en doa bet o c'heneil. Poan gollet! Kadarnaat a rejont en o mudelezh daoust d'an taolioù puilh a zegemerjont int ivez. Kadarnaat a rae ivez ar soudard en e vrouez o welout e zic'halloud d'ober d'an tri den plegañ d'e youl. Kilañ a reas tri c'hammed hag e tiskargas enno e vindrailherezig betek an tenn diwezhañ. Kouezhañ a reas an tri den en o foull.

Yann MIKABEL, Peoc'h an aouravaloù c'hmery  
1970.

#### SOLIEKAAT

Un emsav broadel a loc'h diwar ur saviad darnel (saviad direizh ar vroad), met ar stourm goulenet gant ar saviad-se a zegas an emsaverion da bostañ en emsav broadel muioc'h eus o buhez eget ma poster er vuhez vroadel voutin; e vuhez holl a lak an emsaver enep d'un direizh darnel. Daou zegouezh zo neuze: pe e vuhez holl en em gav enket en ur c'hombod darnel ha n'eus anezhañ nemet ur broadelour strizh, chaovinek ha gwarsellus, pe e vuhez a laka speurennoù ar c'hombod da darzhañ hag en em gav engouestlet en ur stourm hollel. Aze emañ an hent hon eus kemeret, a gredan. Ret eo avat meizañ mat ar pezh a c'hoarvez.

En derou ez eo an emsaverzh un arc'hwel arbennik eus hon buhez, - e-touez arc'hwelioù all. An arc'hwel-se avat ne ra nemet kreskiñ, oc'h aloubiñ ar vuhez diwar goust an arc'hwelioù all. Un enkadenn spontus eo, - an dispac'h hiniennel. An arc'hwel emsaverzh a dizh ur poent a emled ma kemer hollegiezh ha ma koll arbennigiezh: an emsaverzh n'eo ket mui un arc'hwel e-touez arc'hwelioù all eus ar vuhez, met deuet eo da vezañ tra ar vuh-

ez. Ennañ ha dioutañ e tiwan arc'hwelioù nevez a gemer lec'h an arc'hwelioù kozh ezvevennet. An den nevez zo ganet; ar paotr en deus degaset e holl valizennoù en Emsav da vat. An anadenn-se a anvfen a-walc'h ar soliekaat: an emsaverzh oa un arc'hwel soliet er vuhez kozh, dont a ra da vezañ sol arc'hwelioù ar vuhez nevez.

EMSAV 40/141-142 1970.

#### BOMBARDER HA BLEIZ EN HEVELEP TOULL

Son skiltrus ar vombard, evel un taol-kurun, a darzhas e goueled an toull ha, re-bar da wagennoù ar mor oc'h en em ledañ war an traezh kompez, en em skignas er-maez a-us d'ar vro a-bezh.

Alvaonet e voe ar bleiz gant ur seurt safar hag, o krediñ, emichañs, e oa dirazañ gwashoc'h loen egetañ, e kilas adarre betek ar penn pellañ d'an toull hag en em skoachas eno en ur c'hourdrouz diviñs etre e zent gant ar spont a oa kroget ennañ.

Neuze e wellas un tammig da vMatulin, hag e reas un ehan, rak dianalet e oa gant ar bec'h en doa graet. Met o welout e oa sioulaet d'e enebour e teuas adarre hardishagezh d'al loen kris, hag e kerzhas etrezek ar soner, rusoc'h eget biskoazh an daou-lagad a oa en e benn. Yadal a rae en un doare euzhus, ha trouz e vouezh c'hros ha strafuilhus a lakae holl heklevioù an toledad da dregerniñ gant he razailh estlammus.

Met ar vombard a zivorfilas adarre, ha neuze kerkent, evel ma varv an tan pa vez taolet dour warnañ, e tavas ar bleiz gant e yudadenoù. Gant holl nerzh e skevent e c'hwezhe Matulin en e venveg, ha kement a imor a lakae da son, gant an dizesper a oa ouzh e vroudañ, ma oa e zivjod re-bar da ziv gaolirvinenna ma

c'hlizennne ar c'hwezenn war e dal.

Yeun ar GOW, Ur galedenn a zen

116.

## GLESKERED

An neb a gred gwelout an emsaverion evel soudarded sentus ha bouzar nemet ouzh urzhioù o ofiserion, a vo marteze ur soudard mat, met n'eo ket en ul lu-dieubiñ. Galloud an emsaver zo ur galloud dispac'hañ; el lec'h ma vez, ha pa ve e-unan-penn, ez eo an emsaver ul lu dispac'hel dioutañ e-unan: labour-penn, ez eo an nerzh-sujañ ha da sevel an nerzh-dieubiñ. Anat eo, ha pa ve soudard eus ar rez izelañ el lu-dieubiñ, en deus da vezañ galloudekoc'h eget ur c'honoral en nerzh-sujañ. Mard eo amkan an emsaver bezañ koronal e-giz koronaled al lu gall, ez eo gwell evit an Emsav ez afe d'al lu gall diouzhtu da seveniñ e c'halvidigezh. Rak an dispac'h a c'houlenne ur patrom tud nac'hell ket bezañ hini al luioù reoliek. E pep dispac'h ar emañ nerzh-krouiñ an dispac'h hag an nerzh-krouiñ-se zo un tamm mat muioc'h eget nep galloud da ren ha da c'hour-c'hemenn.

Galloud an emsaver zo bezañ kreiz an Emsav e kement lec'h ma vez. An emsaver na oar ket petra lavarout d'an dud pe a gont war ur stroll-ren evit merkañ dezhañ petra ober, zo ur glesker, mat hepken da c'hakal e geun al ledemsavioù. Gleskered eus ar seurt-se a vez atav prest da c'houlenne ur roue evel hollremed d'o dic'halloud, ul levier a sammo warnañ an emell da chaokat dezho luganoù an deiz, da c'hourc'hemenn dezho taolioù-fourgas an deiz. Ar gwellañ levierzh a oufed ijinañ ne ray ket emsaverion eus tud ha n'int ket emsaverion.

EMSAV 30/164-165 1969.

117.

MAR GOUFEC'H E TEUFEC'H 'VIT ATAV!

101

Ar c'han-se en doa sklintinet neuze ha tarzhet a-dreuz al latar evel dre ur wask, ur frailh. Evel pa vije bet un taol jel e-barzh an ec'honder gloanek-se. Difukañ a reas evel dour war c'horre ur glerenn skorn, leuniañ an draonienn, ha neuze mont da lipat an torgennaou, damanavet a-dreuz ar vogidall, evel ramzed, o kreskiñ dre ma teu an amc'houlou.

Hag e kendalc'he ar c'homzoù da redek, fresk, drant, aere! hag e tregerne ar vouezh, ken sur, ken eeun, trouz all ebet nemeti, ma klevet kouls lavaret ur c'hlemm, c'hwezhet gant an daer-ou, o leuniañ ur bruched, gwasket ha ponner.

Pell amzer on chomet da selaou ar vouezh-se, en abardaez o c'hlazañ. Ha trumm eo tavet. En em gavet on neuze va-unan. Va-unan c'hoazh gwashoc'h kant gwech eget diagent. Gortozet 'm eus anezhi da adkregiñ. Evel na zeue mui betek emon e'm eus klasket un trouz all bennak: ur c'hi da harzhal, ur sailh da ziskenn e-barzh ar puñs. Hogen tevoc'h-tevañ ha fetis e oa al latarenn ken na oa mui netra evit treuziñ ar sioulded veur.

Hag eo chomet sec'h va genou, ouzh va staon blaz ar c'han-se a'm boa klevet o tarzhañ, en doa sklintinet en-dro din, hag a oa bremañ tavet.

D.K. KONGAR, Gant blaz an avaloù ruz

11.

## AR RISKLADUR ISTOREK

Evel ma'z eo ar poell bepred ar poell eus ur c'horf fetis, ez eo an divez bepred an divez eus un ober resis.

Ne c'haller ket barn ha poellek pe get eo un ober hep e veizañ e-keñver poellelezh an embregadur a-bezh. Mar gwelit un den o reiñ lamm d'unan all hag o terc'hel anezhañ en diaskren,

e tastumot marteze emañ o lemel e vuhez digantañ. Pa anavezot an istor a-bezh avat e ouezet e oa an "argader" un den a vire ouzh unan all a emlazhañ. Poellouriezh an Emsav ned eo netra estreget ar skiant a ro an tu da anaout an "istor a-bezh", ha da veizañ pep darvoud ha pep ober evel un arroud anezhañ,- skiant an darempredoù fetis ha poellel war un dro etre sol, pal ha hent an Emsav e pep mare. Ar skiant pleustrek-se ne vez ket perc'hennet en un devezh: anaoudegezh sol, pal ha hent an Emsav ned eo ket un anaoudegezh plaen ha levrek, ned eo ket muioc'h ur chemet kantouezel gounezet dre ur pleustr diemvarn. O risklañ e vez bepred sol, pal ha hent an Emsav etrezek furmoù nevez. Diaesañ micher ar bed eo sturiant ar riskladur istorek. Micher an emsaver eo koulskoude.

EMSAV 34/301 1969.

UR BROSESION DREGERIAT DIBAREK

Hag ar beorion 'ta!... a bep tu d'en hent, war bennoù o daoulin, pe harpet ouzh ar c'hleuzioù, bez' e veze regennadoù klaskerion-vara, paotred ha merc'heñ, kozh ha yaouank, dall, moñs pe mac'hagnet, darn war flac'hoù, darn all hep gar ebet ha kluchet en ur c'hased izel war rodoù, hemañ oc'h eoniñ skoet gant an droug-sant, henhont gant trouskennoù ha goulioù spontus, un heug hag ur rukun sellout outo! Ha blejal, youc'hal, garmiñ, beogal ha yudal a raent gwitibunan, pep hini en e yezh, hag abouez-penn, ken ma veze o safar trec'h da voubou ar pedennoù, diskan ar c'hantikoù, soroc'h ken lies a votez o voustrañ poultr ha mein an hent bras, da n'eus forzh peseurt trouz all, ha zoken da vimbalaon ar c'hleier o vrallañ.

Evit va c'heloù, fromet e vezen dreist-holl gant an "inos-anted", pikolioù kañfarded diarc'hen ha diskabell, lart ha kreñv

da welout, a-wechoù gant barv hir ha louet, darn hanter-nozh, darn all gant ur sae vastaret en-dro dezho evel hini ur c'hrouadur nevez krog da gerzhout. Aon a'm beze loken rak an urupailhoù-se na baouezent ket a vabouzañ, a skrignal pe a zifronkañ, hag a ober buhez d'eo laou en ur gammañ o genou gwashoc'h eget marmouzed. Ken stank ha grizilh e kouezhe war ar c'hlazem dirak ar beorion santimoù ha gwenneion, ha d'ar c'houlz-se, kric-eaion, e vire c'hoazh ur gwenneg a netra e holl dalvoudegezh.

Jarl PRIEL, Va sammis buhez 1954.

LOC'HADENN-VEURE ER SAHARA

Kargañ a rejomp ar vendalc'her e log unan eus an daou gar. Ha pep hini en em lakaas ouzh e rod-stur. Gwilh ouzh hini stlej-er ar c'harrdouger, René ha me ouzh hini ar 4X4 Renault. E-pad ur predig e lezjomp ar c'hefluskerioù da dommañ, ha kuit goude hep ober re a drouz evit tremen hep dihuniñ ar c'hamp; ar gward Djendli hepken hen c'hevarc'has pa dreuzjomp ar c'hamp. Straed vras Hassi Messaoud a oa didud ken abredidiouzh ar beure. Buan e voemp e-maez eus kêr, pevar-ugent kilometr nor boa d'ober evit tizhout Wargla. Etrezo ne oa netra nemet uhelgompennoù meinel ha torgennoù gips dastroc'het gant traoniennoù, lec'h ma stumm hag adstumm an avelioù tevennoù traezh reizhan. Ar hent ledan ha teret mat, savet abaoe 1958 hepken, goude dizolcidigezh an tireoul, a gildroe etre an tevennoù, o krapañ gant an uhelgompennoù hag o tiskenn en traoniennoù. Heñvel ouzh an Nevada pe Mec'hiko-Nevez, a weler alies er westernoù, e seblante din ar rann-se eus ar Sahara. A-wechoù e kejed ouzh tropelloù kañvaled pe givri o peuriñ ar geot rouez a gresk memestra bep nevez-amzer, hogen e derou miz gouhere e oa ar geot krazet endeo, ha ne gejjomp nemet ouzh daou pe dri c'hañval treut-eskern, huallet o

zreid a-raok, hep gwelout o mesaer.

Yann MIKAEL, Tonkad Harki 1969.



Koumanant 12 niverenn..... 48 F.  
 Koumanant da 6 Rann eus ar Geriadur Istorael..... 48 F.

Kener : G. ETIENNE  
 Embanner : G. CHEREL  
 Sekretouriezh : Preder, 30 Place des Lices 35-RENNES

An arc'hant da : Preder, CCP 16 093 13, Paris

Trede Trimiziad 1971  
 Priz ar c'haier-mañ : 10 F.

Moulet gant SADED  
 ©PPP Nn 35-709  
 Diskleriet hervez lezenn, trede trimiziad 1971



